

Karl MARX
ha
Friedrich ENGELS

**MANIFESTO
AR STROLLAD KOMUNOUR
(1847)**

Gant rakskrid ha notennoù F. Engels
evit embannadur saoznek 1888

PREDER
Kaier 114
Kerzu 1968

Karl MARX
ha
Friedrich ENGELS

**MANIFESTO
AR STROLLAD KOMUNOUR
(1847)**

Gant rakskrid ha notennoù F. Engels
evit embannadur saoznek 1888

PREDER
Kaier 114
Kerzu 1968

Kinnig a reomp d'hon lennerion unan eus pouezusañ skridoù politikel an 19^{vet} kantved, an hini a chom c'hoazh, kant - ugent vloaz goude, an efedusañ evit eilpennañ ar broadoù ha treuzfurmiñ ar c'hevredigezhioù. Hag ez eo aviel un denlezh degouezhet en hec'h oad - gour? Pe kelennadurezh istorel dizistremenadus hon oadvezh? Pe c'hoazh ar brasañ taol-kentr biskoazh skoet e kostez ar gristenion? Kenderc'hel a ra ar varksouriezh da rannañ ar pobloù hag an Iliz hec'h-unan. N'eus den er-maez eus ar c'hrogad. E petore kstezenn bennak ma vemp avat, an onestiz kentañ eo an-aout ar pezh a zo e kont. Setu perak e soñjomp ne c'hell holl stourmerion Vreizh nemet gounit korvo o studiañ Manifesto ar Strollad Komunour.

Savet eo bet an droidigezh-mañ diwar an testennoù saoznek, alamanek ha gallek. Trugarekaat a reomp an Ao. Frañsez FAVEREAU, saozneger ampart, evit e genlabour talvoudus.

G. ETIENNE

R A K S K R I D

E M B A N N A D U R S A O Z N E K 1888

Gant embannadur ar Manifesto e teuas un diazez d'ar Strollad Komunour, unvaniezh vicherourion, alaman hepken da gentañ, etrevroadel da c'houde - strollad kuzh dre ret er saviad m'edo Europa gevandirel a-raok 1848. Da geñver Kendalc'h London ar Strollad e 1847, e voe karget MARX hag ENGELS da brientiñ embannidigezh ur raklun damkanel hag embregel klok. An dornskrid, savet en alamaneg, a voe moulet e London e genver 1848, un nebeut sizhunvezhioù a-raok dispac'h gall an 24 c'hwevrer. Un tammig a-raok darsav parizian mezheven 1848 e teuas e goulou un droidigezh c'hallek. An droidigezh saoznek kentañ gant an Dimezell Helen MacFARLANE a zeuas er-maez e London e 1850, war ar Red Republican renet gant George Julian HARNEYS. Da heul, e teuas un embannadur danek ha polonek.

Goude ma voe brevet darsav parizian mezheven 1848, stourmad bras kentañ ar broleteriezh ouzh ar vourc'hizelezh, e risklas evit ur prantad d'an drekleurenn strivoù kevredigezhel ha politikel micherourion Europa. Hag evel e grez dispac'h c'hwevrer, e kev ezatas strolloù discurt ar renkad-perc'henn evit adkemer ar renk kentañ; enket e voe ar renkad vicherour da c'hounit he frankiz-oberiañ ha da zerc'helhe lec'h er c'hleiz pellañ d'ar renkadoù-etre radikal. E kement lec'h ma klaskas an emsavioù proleterel dizalc'h en em ziskouez, e voent flastret didruez. Da skouer, e voe dizcloet gant polis Prus Poellgor-kreiz ar Stroll-

ad Komunour, a oa e sezva e Köln er mare-se. Harzet e voe e izili, ha barnet, en Here 1852 goude eitek miz toull-bac'h. Eus ar 4 here d'an 12 du e padas ar breudad brudet-se, "prosez Komunourion Köln". Kon-daonet e voe seizh eus an damallidi da boanioù toull-bac'h eus tri da c'hwec'h bloavezh. Raktal goude ar varnedigezh en em gavas troc'het al liammoù etre an izili a chome c'hoazh. Evit ar Manifesto, ehañvale bout barnet d'an ankounac'h.

Pa zeuas da renkad vicherour Europa nerzh a-walc'h evit adkregiñ gant un argad nevez ouzh ar renkad-ren, e voe krouet Unvaniezh Etrevroadel ar Vicherourion. An unvaniezh-se avat, diazezet hepken evit ober ur bloc'h eus nerzhoù bev proleteriszh Europa hag Amerika, ne c'halle ket embann diouzhtu pennaennoù ar Manifesto. Dleet oa d'an Etrevroadelenn kaout ur raklun digor a-walc'h da vezañ degemeradus war un dro gant ar c'hweluniadoù saoz, ar broudhonourion c'hall, belgiat, italian, spagnat, hag ivez gant diskibion alaman LASSALLE. MARX; skridaozer ar raklun-se evit unvaniñ an holl strolladoù, en doa fiziañs leun e diorreadur kefredel ar renkad vicherour,- diorreadur a ranke disoc'hañ diouzh kendod an ober hag an daelañ.

Hep mank e tlec an darvoudoù, an droukverzhioù en emgann ouzh ar c'hevalla, an disgra muiodh c'hoazh eget an trec'h, anataat d'an dud distered ar sekr-edoù-kegin bihan dibarek, ha diskouez an hent war-du ur gweladur unvan kloc'hoc'h eus ampegadoù gwirion dishualidigezh renkad ar vicherourion. Ha gant MARX edo ar gwir. Pa zifloekas an Etrevroadelenn e 1874, edo al labourerion en ur stad spered disheñvel-bras diouzh ar pezh e oa bet e 1864, da vare he diazevadur. War o zremvenan edo ar broudhonouriezh e Frañs,

al lasalouriezh en Alamagn, ha zoken ar c'hweluniadoù saoz a dostaas,- daoust m'o doa, evit en darn vrasañ, paouezet pell 'zo a zaremprediñ an Etrevroadelenn,- ken ma tisklerie o arlevier en o anv e Swansea warlene: "paouezet en deus sokialouriezh ar c'hevandir a vezañ ur spontailh evidomp." En devoud pennaennoù ar Manifesto o doa graet araokadennoù ramzel e-touez labourerion an holl vroioù.

Evel-se eo e teuas ar Manifesto war-c'horre endro. A-c'houde 1850 e oa bet an destenn alaman moulet lies gwech en Helvetia, e Saoz hag en Amerika. E 1872 e voe un droidigezh saoznek, embannet evit gwir e New-York, war ar Woodhull and Clapin's Weekly. An embannadur saoznek-se a dalvezas da batrom d'an droidigezh c'hallek a zeuas er-maez e New-York ivez war Le Socialiste. Abaoe, ne voe ket nebeutoc'h eget div droidigezh saoznek, mui-pe-vui distummet, embannet en Amerika. Advoulet e voe unan anezho e Saoz. An droidigezh rusianek kentañ, gant BAKUNIN, a zeuas er-maez eus moulerezh Herzen e Genève, Kolokol, e 1863. Un eil droidigezh diwar bluenn Vera ZASULIČ, ar c'houronez, a voe embannet e Genève ivez, e 1882. Kavet e vez un embannadur danek nevez e "Levraoueg ar Sokialdemokratiezh" e København, 1885; un droidigezh c'hallek nevez e Le Socialiste, Paris, 1886. Bez e oa un droidigezh spagnolek war ar stern: dont a reas e goulou e 1886 e Madrid. Diaes eo merkañ niver dik an adembannadurioù alamanek: daouzek eus anezho da nebeutañ. Un droidigezh armeniek, edod o prientiñ e Konstantinopl, ne zeuas ket er-maez: hervez a voe kontet din, n'en doa ket bet an embanner kalon a-walc'h da embann ul levr dindan anv MARX, tra ma nac'he an troer lakaat an oberenn da dremen evit e hini. Keloù a'm eus bet eus troidigezhioù all

e yezhoù all, met n'int ket deuet betek ennon. E-se, ez eo istor ar Manifesto an adsked rik eus istor an emsav micherour arnevez: hiziv ez eo, direndael, an oberenn skignetañ hag etrevroadelañ eus al lisheradur sokialour a-bezh, ar raklun boutin da viliadoù micherourion en holl vroioù, eus Siberia da California.

Ha koulskoude, pa zeuas er-maez, n'hor bije ket gallet e dalbenmañ Manifesto Sokialour. Dindan an anvad "sokialour" edo gronnet e 1847 diouzh un tu, dalc'hidi ar reizhiadoù utopek disheñvel: owenourion saoz, fourierourion c'hall - an eil re hag ar re all kouezhet tamm-ha-tamm e renk ar rannluskadoù toc'h-or - ha diouzh an tu all triaklerion discourt ar sokialourion, a venne lemel an digevatalderioù kevredigezhel a bep doare, gant a bep seurt skridverniadurioù dizañjer evit ar c'hevaled hag an helv. Ar re-se oa tud o vevañ er-maez eus an emsav micherour hag o klask kentoc'h asant ar renkadoù "stuziet". Er c'hontrol, an darn eus ar vicherourion o doa komprenet skorted an eilpennadurioù politikel hag a c'houlenne un treuzfurmader eus diazezoù ar gevredigezh, a gemere neuze an anv "komuncour". A-vec'h divrazet e oa o c'homuncouriezh, gros un tammig a-wechoù ha bondougel rik - hogen da vleit e talvezas ha kreñv a-walc'h e voe e-barzh ar renk vicherour evit geneldiv reizhiad a gomuncouriezh utopek: e Frañs hini CABET hag en Alamagn hini WEITLING. E 1847 e oa ar sokialouriezh ul luskad a renk-etre, ar gomuncouriezh ul luskad micherour. Gant ar sokialouriezh e oa, war ar c'hevandir da nebeutañ, ur c'hwezh saloñs, - gant ar gomuncouriezh e oa ar c'hontrol bev. Hag evel ma soñjemp groñs ken abred ha neuze "e tle dishualidigezh ar vicherourion bezañ labour ar vicherourion o-unan" ne

oa evidomp douetañs ebet ken war an anv a zleemp kemer. Nepred abaoe n'eus bet keloù ganimp d'e zilezel.

Evit d'ar Manifesto bezañ hon c'henoberenn, e rank-an diskleriañ ez eo MARX a zegasas ar bennaenn-stur a dalvez dezhañ da boell. Setu hi: da bep oadvezh eus an Istor, ez eo ar modoù-kenderc'hañ hag -eskemmañ - hag ar framm kevredigezhel o tisoc'hañ dioutodre ret, - an diazezoù o tougen istor politikel ha kefredel an oadvezh, hemañ o kavout enno alc'houez e ziskleriad-urezh; dre-se, istor a-bezh an denclezh (abaoe steuzidigezh ar framm kentidik merket gant kenbere'hentiezh an atil hag ar glad) zo istor stourm ar renkadoù, stourm etre korvoerion ha korvoidi, etre renkadoù-ren ha renkadoù gwasket; istor ar stourm-se a zo un dedroadur ma tirazomp bremañ ar prantad na c'hell ar renkad korvoet ha gwasket (ar broleteriezh) en em zieubiñ diouzh yev ar renkad korvoet ha mestronier (ar vourc'hizelezh) hep dieubiñ war un dro ha da vat ar gevredigezh a-bezh diouzh pep korvoerezh, pep gwaskerezh, diouzh pep diforc'hioù renkadel ha pep stourm ar renkadoù.

Ar c'heal-se a zo, hervezon, galvet da zegas en istorouriezh an hevelep arakadur ha ma tegasas damkaniezh Darwin en naturouriezh, - hor boa divrazet hondaou tamm-ha-tamm er bloavezhioù kent 1845. Va levr Saviad ar renk vicherour e Bro-Saoz a ziskouez betek pelec'h e oan aet war an hent-se. Hogen pa adkavis MARX e Brussel en nevez-amzer 1845, en doa e beursav-let hag en en displegas din ken fraezh ha m'emaon o paouez ober.

Eus hon rakskrid boutin evit embannadur alamanek 1872, e tennan an arroud-mañ:

"Daoust m'o deus kemmet kalz an amveziadoù e-kerz an ugent-pemp bloavezh tremenet, ez eo bepred ken dik

hiziv ar pennaennoù hollek displeget er Manifesto-mañ. Tu a ve da wellaat munudoù zo amañ hag ahont. Ar Manifesto e-unan a ziskler e vez bepred hag e pep lec'h arveradur ar pennaennoù e dalc'h an amveziadoù fotis ha n'eo ket dav enta reiñ re a bouez d'an darbaroù dispac'hel meneget e dibenn ar rann II. E meur a geñver e ve hiziv an arroud-se da skrivañ en un doare all. Dirak araokadurioù dirveur ar greanterezh e - doug an ugent-pemp bloavezh tremenet, hag araokadurioù ar frammidigezh en ur strollad eus ar renkad vicherour, dirak kantouezadurioù dispac'h c'hwevrer da gentañ, ha Kumun Paris dreist-holl, pa lakaas houmañ e-pad daou viz ar galloud politikel evit ar wech kentañ etredaouarn ar broleteriezh, ez eo koshaet ar raklun-mañ war grefen zo. Ar Gumun he deus anataet ne c'halle ket ar renkad vicherour tremen gant aloubiñ ardivink ar Stad hag he lakaat da dreiñ evit he mad dezhi. (Sl.: An En-brezal e Frañs, diskloriadenn a-berzh KuzulHollek Unvaniezh Etrevroadel ar Vicherourion - embannadur alamanek - ma'z eo displeget klokoc'h ar mennoz-se.) A-hend-all ez eo anat e van darnel an dezramerozh eus al lizheradur sokialour, peogwir e chom a-sav e 1847. Heñvedra, mar chomont reizh en o fennaenn, an evezhiadennoù war savlec'hiadur ar gomunourion e - keñver ar strolladoù-eneberezh all (Rann IV), ez eo displeget hiziv an displegadur anezho dre ma'z eo kemmet penna-da-benn ar saviad politikel, hag ez eo aet da get gant an emdroad istorel an darnvuiañ eus ar strolladoù ez-revellet enno. Koulskoude, ar Manifesto zo anezhañ un teul istorel na gredomp ket kaout ar gwir da zaskemmañ ken."

Friedrich ENGELS
London, 30 genver 1888.

MANIFESTO
AR STROLLAD KOMUNOUR

Ur spes zo o hentiñ Europa: spes ar Gomunouriezh. Evit enkañ ar spes-se o deus en em unanet holl c'halloudezhioù Europa gozh: ar Pab hag an Tsar, Metternich ha Guizot, radikaled Frañs ha poliserion Alamagn.

Pelec'h emañ ar gostezenn eneberezh na ve bet tamallet dezhi bezañ komunour gant piaouerion ar galloud? Pelec'h emañ ar gostezenn eneberezh n'he defe ket graet ar rebech divrudus a "gomunouriezh" d'hec'h enebourion a gleiz pe a zehou?

A gement-se e tezastumer daou dra:

Anavezet eo ar gomunouriezh endeo evel ur c'halloudezh gant holl c'halloudezhioù Europa.

Poent bras eo d'ar gomunourion embann dirak ar bed a-bezh o meizadurioù, o falioù, o mennadoù ha diz-ARBENN koñchennoù spes ar gomunouriezh dre ur manifesto gant ar strollad e-unan.

Setu perak o deus komunourion eus meur a vro en em vodet e London, ha savet ar manifesto da heul, a vezo embannet e saozneg, en alamaneg, en italianeg, e flamaneg hag e daneg.

I

BOURC'HIZION HA PROLETERION (1)

Neñ eo istor kement kevredigezh a zo bet (2) nemet istor stourm ar renkadoù.

Den rez ha sklavour, brientin ha gwerin, aotrou ha serv, penn korfuniad ha kompagnun,- en ur ger gwaskerion ha gwaskidi, zo savet atav an eil a - enep d'egile, hag ur stourm dizehan o deus renet, dre guzh a-wechoù, ur stourm a zisoc'he bepred pe gantadframmadur dispac'hel ar gevredigezh a-bezh, pe gant dismantr ar renkadoù enebet.

E mareadoù kentañ an istorvezh, e weler hogos dre-holl ez eo peurreizhet ar gevredigezh e renkadoù diforc'h hervez ur skeul dereziat a renkoù. En Henroma, e veze patrikianed, marc'heion, plebeianed, sklaved; er Grennamzer, aotrounez, gwizion, pennoù korfuniad, kompagnuned, deskarded ha served; hag ouzhpenn, tost e pep renkad, un urzhaz a-ziforc'h.

Ar gevredigezh vourc hiz arnevez, bet savet war dismantrou ar gevredigezh c'hladalc'hel, n'he deus ket en em zisc'hraet eus an enebiezh etre renkadoù. Erlec'hiañ oute renkadoù nevez, doareoù-gwaskañ nevez stummoù nevez a stourm n'he deus ken gract.

Azon hon amzer, amzer ar vourc'hizelezh, ez eo hemañ evelato: bezañ ceunaet an enebiezh etre renkadoù. Mui-ouzh-mui en em rann ar gevredigezh a - bezh e daou bezh kamp enebour, e div renkad vras enebetkrenn: ar vourc'hizelezh hag ar broleteriezh.

Gant served ar Grennamzer e voe ganet dinazour-

ion ar c'humunioù kentañ. Diouzh an dinazourion-se o tiwanas elfennoù kentañ ar vourc'hizelezh.

Dizoloadur Amerika, troverdeerezh Afrikaa bourchasas un dachenn nevez d'ar vourc'hizelezh o tiwanañ. Nevidoù India ha Sina, trevadennadur Amerika, ar c'henwerzh gant an trevadennoù, paotidigezh an araezioù-eskemm hag ar marc'hadourezhioù dre vras, a roas ul lañs, dianav betek enc, d'ar c'henwerzh, d'ar merdeerezh, d'an ijinerezh; da heul, e lakaas un elfenn dispac'hel da greskiñ buan er gevredigezh c'h laddalc'hel o tisac'hañ.

Reizhiad c'hladalc'hel an ijinerezh, ma edo ar c'henwerzh ijinerezhel e dalc'h korfuniadoù kloz, ne vaste ket mui da ezhommoù brasoc'h an nevidoù nevez.

Al labouradegoù a gemeras lec'h ar reizhiad-se. Bourc'hizelezh vihan an ijinerezh a zistroadas ar pennoù korfuniad; rannadur al labour etre lies korfuniad a gilas rak rannadur al labour e-barzhpep labouradeg.

Keid-all en em astenne an nevidoù dibacuez, e save bepred ar goulenñ Al labouradegoù o-unan a voe divastus. Neuze e voe reverzhiet ar c'henderc'h ijinerezhel gant ar vurezh hag an ijinenn. Distroadete voe al labouradegoù gant ar greanterezh, bourc'hizelezh an ijinerezh gant mondianed ar greanterezh, renerion gwir armeadoù greantel anezho, ar vourc'hizion arnevez.

Ar greanterezh en deus diazezet an nevid-bed, bet prientet gant dizoloadur Amerika. An nevid-se a vuanaas ur souezh emgresk ar c'henwerzh, ar merdeerezh, ar c'hehenterezh. Seurt diorreadur a levezonas, d'e dro, emastenn ar greanterezh, ha bepm'en em lede ar greanterezh, ar c'henwerzh, ar merdeerezh, anhouarnhentoù, e kreske ar vourc'hizelezh, o tekkemete

he c'hevalaoù, ez argase war-dreñv kement renkad a vare ar Grennamzer.

Disoc'h un hir a emdroadur hag ur rummad rev-erzhioù er modoù-kenderc'hañ hag -eskemm ez eo ar vourc'hizelezh hec'h-unan, evel ma weler.

E pep prantad eus hec'h emdroadur, he deus ar vourc'hizelezh graet arackadennoù politikel. Renkad gwasket dindan yev ar vonez c'hladdalc'hel, kevredad emren armet e-barzh ar gumun (3); amañ republik-kêr dizalc'h (4), ahont Trede Stad aneradus ha telladus gant an unpenniezh (5), da c'houde, e-doug prantad al labouradegoù end-eeun, kempouez d'an noblañs evit an unpenniezh c'hladdalc'hel pe diharzveli, e gwir asoup an unpenniezhoù meur, ez eo deuet ar vourc'hizelezh en diwezh, abaoe ma'z eo diazezet ar greanterezh, da unpiacuañ ar veli bolitikel erStad dere'h-ouezel arnevez. Levrierezh ar Stad arnevez ned eo nemet ur poellgor o verañ aferioù boutin ar vourc'hizelezh a-bezh.

Ur roll dispac'hel kenan he deus betar vourc'hizelezh en istor.

Ar vourc'hizelezh, e kement lec'h m'he deus aloubet ar veli, he deus freuzet an darempredoù gladdalc'hel, uheldadel ha mesaerganel. Torret he deus didruez al liammoù liesseurt ha kemplezh a stage an den gladdalc'hel ouzh e "vistri natur", ha n'he deus miret da ere etre an den hag an den nemet al laz dibourc'h, an talañ "war an daol". Beuzet he deus gour-savioù nevetañ ar gred relijiel, ar virvidigezh varc'hegel, an drivliadelezh vihanvourc'hizel edourioù yen ar jediñ emgar. Un talvoud eskemm he deus graet diouzh dellid mab-den; erlec'hiet he deus frankiz uhel ha dizamant an nevid ouzh ar frankizioù

diniver gounezet ken diaes. En ur ger, he deus erlec'hiet ur c'horvoañ digor, divezh, eeun, rust ouzh ar c'horvoerezh skoachet dindan touelloù kravezel ha politikel.

Ar vourc'hizelezh he deus lemet he lufr diwar gement obererezh a veze enoret betek enno hag a veze douget bri dezhañ. Gopridi he deus graet eus ar mezeg, ar gwiraour, ar beleg, ar barzh, ar skiantour.

Ar vourc'hizelezh he deus freuzet ar ouel a drivliadelezh a-ziwar an darempredoù-tiegezh evit ober anezho darempredoù-arc'hant hepmuiken.

Ar vourc'hizelezh he deus disklozet penaos e kenglote dre natur arver rust an nerzh er Grennamzer - ken kehelet gant ar gilstourmerion - gant ar washañ diegi. Diskouezet he deus evit ar wech kentañ pezh a c'hell degas obererezh mab-den. Marzhioù trec'h da biramidennoù Egipt, d'an doursenioù roman ha d'an ilizoùgotek, he deus savet; kaset he deus da benn argadennoù trec'h da gement aloubadeg ha da gement kroaziadeg diaraok.

Ne c'hell ket ar vourc'hizelezh bezañ hep reverzhañ dalc'hmat an araezioù-kenderc'hañ, eleze ar c'heñverioù-kenderc'hañ, ha ganto, holl darempredoù ar gevredigezh. Mirout digemm mod kozh ar c'henderc'hañ a oa, en eskemm, un diviz ret-holl evit kenderedù kent an ijinerezh. Seurt reverzhi c'hladdalc'hel ar c'henderc'hañ, seurt eilpennadur diastal e framm ar gevredigezh, seurt birvilh ha seurt disurentez diarsav, setu an diforc'h etre ar marevezh bourc'hizel hag ar re gent. Skubet e vez kuit an holl darempredoù henvoazel sonnet, gant o aridennadoù a rakvarnioù hag a vennozioù kozh ha doujadus; ar re nevez-savet a gosha a-barzh gallout sonnañ. Steuziañ a ra kement a zo start, dinevetaet e vez kement a zo sakr, hag en diwezh, e vez rediet mab-den da sellout didouell ouzh gwir stuz e vuhez hag ouzh e zar-

empredoù gant an dud.

Broudet gant un ezhomm a werzhlec'hioù bepred nevez, ez aloub ar vourc'hizelezh ar bed a-bezh. Neizhiañ a rank e pep lec'h, en em ziazezañ e pep lec'h, skoulmañ darempredoù e pep lec'h.

Dre gorvoiñ an nevid-bod he deus roet un dremm liesvroadek d'ar c'henderc'hañ ha d'ar beveziñe pep riez. Siwazh d'ar gilstourmerion, he deus lamet he sol broadel a-zindan treid an ijinerezh. Distrujet eo bet, pe distrujet e vez bendez an hollijinerezhioù broadel kozh. Distroadet e vezont gant ijinerezhioù nevez, ma ne c'hell nep bro sevenaet o dioueriñ anez mervel, gant ijinerezhioù na reont ketmui gant danveziou kraï eus ar vro, met gant danveziou kraï eus an toleadoù pellañ, ijinerezhioù a vevezer o c'henderc'hadoù, n'eo ket hepken er vro hec'h-unan, met e pep lec'h dre ar bed. E-lec'h an ezhommoù kozh a vaste dezho kenderc'hadoù ar vro, e tiwan ezhommoù nevez o c'houlenn kenderc'hadoù eus ar broioù hag eus an hinadoù pellañ. E-lec'h digenvezded hag emvastererezh ar ramvroioù hag arbroioùkezh, e tiwan kenereoù ha kenlevezon estre an holl vroioù. Gwir eo evit ar c'henderc'h danvezel, ha ken gwir all evit ar c'henderc'h speredel. Ferc'henniezh an holl e teu da vezañ oberoù speredel ar vro. Diaes-oc'h-diaes e teu da vezañ ar c'houbarzhlezh hag an harzoù broadel, ha diouzh liesegezh al lennegezhioù broadel pe lec'hel e tiwan lennegezh an hollved.

Dre wellaat buan an holl araezioù-kenderc'hañ, dre glokant diehan ar c'hehentererezh, ar vourc'hizelezh a zesach an holl vroioù, ha betek ar re ouesañ war-du froud ar sevenadur. Ar marc'hadmat m'emañ he marc'hadouerezhioù a dalvez dezhi da ganoliererezh evit freuzañ an holl vegerioù-Sina hag a redi ar var-

bared an aheurtetañ ouzh an estrenion d'en em zaskoriñ. Rediañ a ra an holl vroioù da zegemer, dindan boan a varv, mod bourc'hizel ar c'henderc'hañ; o rediañ a ra da zegemer ar pezh a anvont "kultur", da lavarout eo da vont da vourc'hizion. En ur ger, emañ o stummañ ur bed diouzh he fatrom.

Ar vourc'hizelezh he deus sujet ar maezioù ouzh ar c'hêrioù. Fikolioù kêrioù he deus savet; lakaet he deus poblañs ar c'hêrioù da greskiñ e-leizh e-keñver hini ar maezioù, hag e-se he deus frapet un darn vras eus ar poblañs diouzh louaderezh ar ploue. En hevelep doare m'he deus sujet ar maezioù d'ar c'hêrioù, he deus lakaet ar broioù barbar pe hanter-varbar dindan yev ar re sevenaet, broioù kouerion dindan yevbourc'hizion, ar Reter dindan yev ar C'hornog.

Mui-ouzh-mui en em zisgra ar vourc'hizelezh eus brazhunadur ar poblañs, an araezioù-kenderc'hañ, hag ar berc'hentiezh. Tolpañ ar poblañs he deus graet, kreizennañ an araezioù-kenderc'hañ, strollañ ar berc'hentiezh estre daouarn un niver bihan a dud. An heuliad ret eus kement-se e voe ar c'hreizennererezh politikel. Proviñsoù dishual, pe a-vec'h kevreet etrezo, dezho lazioù, lezennoù, gouarnamantoù, tellerezhioù diforc'h, a voe tolpet d'ober ur riez nemeti, dezhi ur gouarnamant, un dezvadurezh nemeto, ul laz broadel a ronkad, harzoù ha taosoù-maltouterezh.

Ar vourc'hizelezh, en ur ren e-pad a-vec'h ur c'hantved, he deus krouet nerzhoù-kenderc'hañ postek-oc'h ha niverusoc'h eget ar remziadoù diaraok a-gevret. Sujidigezh nerzhoù an natur gant mab-den, an ardivinkelezh, arver ar gimiezh en ijinerezh hag er gounezerezh, ar merdeerezh dre vurezh, an huarnhentoù, ar pellskriverezh tredanel, difraostadur kevandirioù a-bezh, kanoliadur ar stêrioù, pobladoù a-bezh o tiw-

anañ diouzh an douar - pe gantved a-raok en defe diouganet e oa kemend-all a nerzhoù-kenderc'hañ o vorediñ war barlenn al labour kevredigezhel.

Setu ar pezh a weler enta: er gevredigezh c'hladdalc'hel e voe ganet an araeziou-kenderc'hañ hag -eskemm m'en em ziazezas ar vourc'hizelezh warno. D'ur prantad lavaret eus diorreadur an araeziou-kenderc'hañ hag -eskemm-se, na glot ket ken ar c'henderc'hañ hag an eskemm er gevredigezh c'hladdalc'hel, urzhiadur gladdalc'hel ar gounezerezh hag an ijinerezh dornwezhelel, en ur ger, renad gladdalc'hel ar berc'hentiezh, gant an nerzhoù-kenderc'hañ diorreet endeo; hualoù e teujont da vezañ; o zerrañ a renkad; torret e voent.

En o lec'h e savas frankvezezezh ba, war un dro ur framm kevredadel ha politikel azas outañ ha dreist-beli bolitikel hag armerzhel ar renkad vourc'hiz.

Hévélep argerzhad a weler hiziv an deiz. Ar gevredigezh vourc'hiz a-vremañ gant he reizhiad-kenderc'hañ, -eskemm ha -perc'hennañ, ur gevredigezh he deus ganet araeziou-kenderc'hañ hag -eskemm ken bras, zo heñvel ouzh ur sorsor na ve ket evit reoliñ ken galloudoù an ifern en deus galvet. Abaoe meur a zekvloaziad, ned eo istor ar c'henwerzh hag ar greanterezh nemet istor dasstourm an nerzhoù-kenderc'hañ arvevez ouzh ar c'heñverioù-kenderc'hañ arvevez, ouzh renad ar berc'hentiezh ampleget gant bezañs ha beli ar vourc'hizelezh. Trawalc'h eo menegiñ an enkadenoù armerzhel a laka ar gevredigezh vourc'hizel en arvarm-ui-ouzh-mui bep taol. En enkadenoù-se e vez distrujet ent varead-ek, n'eo ket hepken un darn vras eus ar c'henderc'had-ou, met ivez un darn vras an nerzhoù-kenderc'hañ krouet a-gent. En enkadenoù-se e vez drastet ar gevredigezh gant un darreuziad en dije hañvalet bezañ diskiant en amzerioù kent, darreuziad an dreistkenderc'hañ. A -

daol-trumm hag evit ur pennad ez adwisk ar gevredigezh stuz ar varbarelezh; kredete veze eus deust unnaonegezh pe ur brezel-gwastañ da zistrujañ hec'h araeziou-bevañs. Ar greanterezh hag ar c'henwerzh a ziskouez bezañ distrujet. Perak? Peogwir ez eus e kerzar gevredigezh re a sevenadur, re a araeziou-bevañs, re a c'hreanterezh, re a genwerzh. An nerzhoù-kenderc'hañ ne dalvezont ket ken evit mad ar berc'hentiezh vourc'hizel; en enep, deuet int da vezañ re c'halloud-ek eviti, ken e vezont hualet ganti, ha bewech ma vezont trec'h war an hualoù-se, e tegasont reustl er gevredigezh vourc'hizel a-bezh hag e lakaont ar berc'hentiezh vourc'hizel en arvar. Re strizh eo keñverioù ar gevredigezh vourc'hizel evit enderc'hel ar hinvidigezh o deus krouet. Ha penaos en em denn ar vourc'hizelezh eus seurt enkadenoù? Diouzh un tu dre zistrujañ dre heg ur bern nerzhoù - kenderc'hañ; diouzh un tu all dre c'hounit nevidoù nevez ha dre gorvoiñ perveshoc'h ar re gozh. Eleze dre brientiñ enkadenoù hollekoc'h ha gwashoc'h ha dre zisteraat an tu da herzel outo.

A-enep d'ar vourc'hizelezh eo en em droet an armoù a dalvezas dezhi evit diskar ar c'hladdalc'h-elezh.

Ar vourc'hizelezh avat n'he deus ket hepken gov-elist an armoù he lazho; ganet he deus ivez an dud a arvero an armoù-se - ar vicherourion arvevez, ar bro-sterion.

Bep ma kresk ar vourc'hizelezh, eleze ar c'hev-ala, e kresk ar broleteriezh, renkad ar vicherourion a-vremañ - ur renkad labourerion na vevont nemet e kement ha ma kavont fred, ha na gavont fred nemet e kement ha ma talvez o labour da greskiñ ar c'hev-ala. Ur varc'hadourezh e-giz nep traezenn-genwerzh ez eo

ar vicherourion, rediet ma'z int d'en em werzhañ a zeiz da zeiz, ha da heul e vezont sujet da verzh-diverzh ar c'hevezerezh ha da lusk-dilusk an nevid.

En arbenn eus arver ledan an ardivinkoù hag eus rannadur al labour en deus labour ar vicherourion kollet pep hiniennegezh, ha da heul pep hoal evit al labourer. Ur stagañenn d'an ardivink n'eo ken hemañ, ha ne c'houlenner digantañ nemet an tun ceunañ, un-tonañ, aesañ da zeskiñ. A-se ne sav ket koust - kenderc'hañ ar micherour en tu all d'ar madoù - bevañse ret dezhañ evit chom en e sav ha gouennañ. Padal priz ur varc'hadourezh - eleze priz al labour - zo par d'he c'houst-kenderc'hañ. Seul heugasoc'h al labour, seul izeloc'h ar gopr-enta. A zo muic'h, bep ma kresk arver an ardivink ha rannadur al labour, e sav samm an trevell, pe dre hiraat aneurvezhioù-labour, pe dre greskiñ al labour goulennet e-pad ur badelezh lavaret, pe dre greskiñ tizh an ardivink.

Ar greanterezh en deus treuzfurmset stalvihan an dornwezhour er greanti bras a ijinerezh kevalour. Yoc'hadoù labourerion, stardet en ur greanti, a vez enframmet e-giz soudarded. E-giz soudarded ar greanterezh, e vezont lakaet dindan renerezh ur rummad klok a ofisierion hag a serjanted. Ned int ket hepken sklaved ar renkad vourc'hiz hag ar Stad vourc'hizel, enframmet e vezont bemdez ha bepredgant an ardivink, an enseller, ha dreist-holl gant bourc'hiz al labouradeg end-eeun. Seul vui ma embann ar mac'herezh-se n'en deus ken pal nemet ar buzañ, seul bishoc'h, seul hakroc'h, seul hegasoc'h e vez.

Seul nebeutoc'h a ampartiz hag a nerzh a vez goulennet gant al labour dornel, e gerioù all, seul vui en em ziorre ar greanterezh, seul vui e vez erlec'hiet labour ar vaouez ouzh labour ar gwaz.

An diforc'hioù a oad hag a rev n'o deus pouez kevredigezhel ebet ken evit ar renkad vicherour. Ar-aezioù-labour ez int holl, hag e koustont ker pe geroc'h hervez an oad hag ar rev.

Ur wech korvoet al labourer gant ar greantour e vez talet e c'hopr dezhañ hag e kouezh etre krabanoù izili all eus ar vourc'hizelezh: perc'henn e di, ar c'henwerzhour, an uzurer, h.a.

Gwiskad izelañ ar c'hendereoù-etre - an oberatourion vihan, ar genwerzhourion, hag ar varc'hadourion war o leve dre vras, an dornwezhourion hag ar gouerion - a sank tamm-ha-tamm er broleteriezh, diouzh un tu, dre ma ne gлот ket o zamm kevala gant ezhommoù ar greanterezh, ha trec'het e vez hemañ gant ar gev-alaourion vras; diouzh un tu all, dre ma vezdisteraet o chemet micherel gant hontenoù nevez ar c'henderc'hañ. Ma kaver er broleteriezh tud o tont eus holl genereoù ar gevredigezh.

Tremen a ra ar broleteriezh dre veur a bazenn. Gant he ganedigezh e teraou he stourm ouzh ar vourc'hizelezh. Da gentañ e vez renet ar c'hrogad gant hiniennoù eus ar vicherourion; da c'houde gant micherourion ur greanti; goude gant micherourion ar skourr-mañ-skourr, el lec'h-mañ-lec'h, a-enep hiniennoù eus ar vourc'hizion a gorvo anezho rag-eeun. Ne dagont ket hepken keñverioù bourc'hizel ar c'henderc'hañ, met an araezioù-kenderc'hañ o-unan; distrujañ a reont ar marc'hadourezhioù enporzhiet a gevezata ouzho labour; mekaat a reont an ardivinkoù; lakaat an tan er greantioù, ha klask adkavout dre heg saviad kollet dornwezhour ar Grennamzer.

D'ar poent-se, ned eo ar broleterion nemet ur yoc'h strewet dre ar vroad ha bruzhunet gant arc'hevezerezh. Mar c'hoarvez ganto en em unaniñ o lec'h pe

lec'h da ren ar stourm a-gevret, nod eo ket c'hoazh dre berzh o unvaniezh end-eeun, met dre berzh unvaniezh ar vourc'hizelezh, rediet ma'z eo-hi da reiñ lañs d'ar broleteriezh a-bezh evit tizhout he finveziou politikel, gouest ha ma'z eo d'henn ober c'hoazh evit ar poent. D'ar mare-se enta ne stourm ket ar broleteriezh ouzh hec'h enebourion, met ouzh enebourion hec'h enebourion, aspadenoù an unpenniezh diharzveli, perc'henned ar glad, ar vourc'hizion nanngreantel, ar vourc'hizion vihan. Emañ an argerzh istorel a-bezh enta e dalc'h ar vourc'hizelezh; un trec'h evit ar vourc'hizelezh eo kement trec'h gounezet e-giz-se.

Padal gant diorreadur ar greanterezh, ne gresk ket ar broleterion dre an niver hepken; tolpet e vezont e yoc'hoù brasoc'h; kreskiñ a ra o nerzh, hag emouezañ a reont muioc'h ouzh an nerzh-se. Keitadañ a ra mui-ouzh-mui al lazioù hag an aozoù-bevañ di-seurt e-touez ar broleterion a feur ma vez diverket an diforc'hioù-labour gant an ardivinkelezh ha ma tiskenn dre-se ar goprou d'an hevelep live tost dre-holl. Distabiloc'h e teu goprou ar vicherourion da vezañ gant kresk ar c'hevezerezh e-touez ar vourc'hizion ha gant an enkadenoù armerzhel a zeu d'e heul. Gwelladur dibaouez an ardivinkelezh, o vont buan-ouzh-buan, a laka bevañs ar vicherourion en arvar mui-ouzh-mui. Mui-ouzh-mui e tro ar c'henstokoù etre hinienoù eus ar vicherourion hag eus ar vourc'hizion da genstokoù etre div renkad. Kregiñ a ra ar vicherourion d'en em gevreañ a-enep d'ar vourc'hizelezh; kevreoù-pad a savont zoken e-sell d'an em-savadegoù a c'hoarvezo. Amañ hag ahont e tisoc'h ar stourm war taolioù-fourgas.

A-wechoù e vez trec'h ar vicherourion, evit ur prantadig avat. Gwir splet ar c'hrogadoù-se n'eo ket

ar berzh a reont diouzhtu, met e kresk an unvaniezh etre ar vicherourion. Aesast e vez an unvaniezh gant arackaat ar c'hehenterezh devoudet gant ar greanterezh, hag a ro da vicherourion eus meur a gêriadenn un tu da skoulmañ darempredoù. Trawalc'h eo an darempred-se evit kreizennañ ar stourmadoù lec'hel niverus, heñvel an eil ouzh egile, en ur stourm a renkad e par ar vro. Hogen ur stourm politikel eo nep stourm renkad. Hag an unvaniezh a c'houlennas kantvedoù digant dinazourion ar Grennamzer en o hentoù-treuz a vez kaset da benn dindan un nebeut bloavezhioù gant ar broleteriezh, bennozh d'an houarn-hentoù.

Freuzet e vez atav enframmadur ar broleterion en ur renkad, ha da heul en ur gostezenn bolitikel, gant ar c'hevezerezh etre ar vicherourion o - unan. Hogen adsevel a ra bepred, kreñvoc'h, startoc'h, galloudusoc'h. Tennañ a ra korvo eus an dizunvanerioù e-touez ar vourc'hizion end-eeun evit o rediañ da anaout dre al lezenn lazioù 'zo eus ar vicherourion. E-giz-se e voe mouezhiet dezv an dek eur-vezh e Bro-Saoz.

Bezot a vezot, lañs a ro ar c'henstokoù etre kendereoù ar gevredigezh kozh da ziorren ar broleteriezh e meur a zoare. En em gavout a raer vourc'hizelezh en emgannoù dihan. Da gentañ ouzh ar vrintinelezh; da c'houde ouzh an hinienoù eus ar vourc'hizelezh end-eeun a zo deuet o lazioù da vezañ enebek da emled ar greanterezh; atav gant bourc'hizelezh an estrenvro. En emgannoù-se e vez rediet ar vourc'hizelezh da c'hervel ar broleteriezh, da c'houlenn sikour diganti, ha d'he desachañ e-giz-se er stourm politikel. Ar vourc'hizelezh hec'h - unan enta a bourchas d'ar broleteriezh elfenoù kentañ

he deskadurezh; e gerioù all, e ro d'ar broleteriezh armoù evit stourm ouzh ar vourc'hizelezh.

A zo muioc'h: evel m'hon eus gwelet c'hoazhe vez tolpet er broleteriezh lodennoù 'zo eus ar c'hendercoù-ren da heul amled ar greanterezh, pe da vihanañ, e vezont lakaet en arvar. Int ivez a bourchas d'ar broleteriezh elfennoù nevez a gelennadurezh.

Erziwezh, d'ar mare ma tosta stourm ar renkadoù d'e boent diwezhañ, e wisk an argerzhad-koazhañ er renkad-ren, hag e gwir, er gevredigezh a-bezh, un neuz ken taer, ken splann m'en em droc'h ul lodenn vihan eus ar renkad-ren ha ma sav a-du gant ar broleteriezh, ar renkad a zo an dazont etre he daouarn. En hevelep doare ma'z eas a-gent darn eus ar vrientinon a-du gant ar vourc'hizion, e sav darn eus ar vourc'hizion a-du gant ar broleteriezh, darn eus ar gefredourion vourc'hiz pegen, deuet a-benn da gompren ent damkanel an argerzh istorel a-bezh.

E-touez an holl gendereoù a sav hiziv a-enep ar vourc'hizelezh, ar broleteriezh hepken zo ur renkad dispac'hel. Dizeriañ a ra ar c'hendercoù all, ken e steuziont dirak ar greanterezh; en eneb, frouezh dilasañ hemañ eo ar broleteriezh.

Ar c'hendersoù-etre, ar c'hreantourion vihan, ar genwerzhourion, an dornwezhourion, ar gouerion a vez an holl anezho o stourm a-enep ar vourc'hizelezh evit chom en o sav evel izili eus arc'hendercoù-etre. Ned int ket dispac'hel enta, mirour ne lavaromp ket. A zo muioc'h: kilstourmer int, rak klask areont lakaat rod an Istor da vont war-gil. Mar deont da vezañ dispac'hel, ez eo dre m'emaint o sankañ er broleteriezh; e-se e tifennont o lazioù da zont, nann a-vremañ; dilezel a reont o savboent evit en em savlec'hiañ er broleteriezh.

Amañ hag ahont e c'hallio ar c'hendere dañjerus, al livastred, ar yoc'h vrein gouzañvat-se dislonket gant gwiskadoù izelañ ar gevredigezh kozh, bezañ desachet gant un dispac'h proleterel; tachet e vo avat dre e stuzioù, d'en em werzhañ d'ar gilstourmerion.

E stuzioù ar broleteriezh ez eo distrujet endeo stuzioù ar gevredigezh kozh. Divadoù eo ar proleter; n'o deus e zarempredoù gant e wreg hag e vugale tra da welout gant re an tiegezh bourc'hiz. Pep brondeg-egh zo bet lamet digantañ gant al labour greantelarnevez, ar sujidigezh arnevez d'ar c'hevvala, ken e Bro-Saoz, ken e Frañs, ken en Amerika, ken en Alamagn. Bez' ez eo al lezenn, an divezegezh, ar relijion evitañ kemend-all a rakvarnioù bourc'hizel en em skoach dindano lazioù ar vourc'hizion.

Kement renkad a voe trec'h en tremened a glaskas startaat he dezvad dre sujañ ar gevredigezh-a-bezh da amlegadoù o c'horvoder. Ne dizho ket ar broleterion ren war nerzhoù-kenderc'hañ ar gevredigezh anez distrujañ ar mod-perc'hennañ a-geñver ganto, ha dre-se an holl vodoù-perc'hennañ kent. N'o deus tra en o c'herz a ve da greñvaat pe da ziogeliñ; bez' o deus da distrujañ pep gwarant prevez, pep surentez prevez diagent.

An holl luskadoù istorel bete-vremañ zobet luskadoù ur bihanniver evit mad ur bihanniver. An emsav proleterel zo emsav emdardhek ha dizalc'h ar muianiver evit mad ar muianiver. Ne c'hell ar broleteriezh, gwiskad izelañ hon c'hevredigezh a-vremañ, fiñval, mont war-raok, hep ma tarzhe kuit an dreistframm a-bezh eus ar gwiskadoù oc'h amparañ ar gevredigezh kefridiel.

En e furm, ha n'eo ket en e sol avat, ez eo stourm ar broleteriezh ouzh ar vourc'hizelezh ur

stourm broadel da gantañ. Ret eo da broleterion pep bro evel just ober he stal d'he bourc'hizelezh da gantañ.

En ur vrastresañ prantadoù diorreadu ar broleteriezh hon eus merket prantadoù an enbrezel, kuzh pe gushoc'h, a zo o reuziañ ar gevredigezh a-vremañ ken ma tarzh ar brezel-se en un dispac'h a-wel d'an holl ha ken ma krog ar broleteriezh da ren dre c'hourzhtreñ ar vourc'hizelezh.

War an enebiezh etre renkadoù gwasket ha renkadoù gwasket ez eo bet diazezet pep stumm a gevredigezh betek-henn. Padal evit mave gwasket ur renkade rank ar renkade-se da vihanañ gallout bevañ en he sujidi-gezh. Sevel a reas ar serv, e-doug prantad ar serverezh, betek dont da vezañ ezel eus ar gumun, dres evel ma tizhas ar partabl dont da vourc'hiz dindan yev an diharzveli c'hladdalc'hel. E-lec'h sevel gant araokaat ar greanterezh, e sank ar micherour arnevez, en eneb, a-is da varr-bevañ e renkade. Tavanteke teu da vezañ hag an davantegezh a gresk buanoc'h eget ar boblañs hag ar binvidigezh. Hag aze e teu anat ez eo divarrek ar vourc'hizelezh da vezañ renkade-ren ar gevredigezh a-vremañ ha da rediañ ar gevredigezh da zegemer hec'h azioù-bevañ. Divarrek eo da ren peogwir ez eo dic'houest da vezañ he sklav en e sklav-elezh, peogwir ne c'hell ket mirout outañ a sankeñ en ur seurt stad ma rank-hi e vevañ e-lec'h bezañ bevet gantañ. Ne c'hell ket muñ ar gevredigezh bevañ dindan yev ar vourc'hizelezh; e gerioù all, ne c'hell ket ar gevredigezh hag ar vourc'hizelezh kenvevañ ken.

Amplegad pennañ bezoud ha beli ar vourc'hizelezh eo daspugnadur ha kreskadur ar c'hevalla; amplegad bezoud ar c'hevalla ez eo al labour gopret. Diaz-

ezet eo al labour gopret war ar c'hevezerezh etre ar vicherourion hepken. Emgresk ar greanterezh, lusket gant ar vourc'hizelezh hep rat dezhi, e-lec'h digenvezded ar vicherourion, heuliad o c'hevezerezh, a leka ar strolladur dispac'hel anezho, heuliad o c'hevredadur. Gant diorreadur ar greanterezh e vez freuzet dindan dreid ar vourc'hizelezh an diazez ma he deus savet he reizhiad-kenderc'hañ ha -perc'hennañ. Toullierion he bez eo a genderc'h dreist pep tra ar vourc'hizelezh. Ken didec'hus eo he dismantr ha trec'h ar broleteriezh.

I I
PROLETERION HA KOMUNOURION

Fennaos en em savlec'h ar Gomunourion e-koñver hollad ar broleteriezh?

Ar Gomunourion n'int ket ur strollad diforc'h enebet ouzh ar c'hostezennoù micherour all.

N'e deus ken laz nemet re ar broleteriezh en he fesh.

Ne savelont pennaenn strizh ebet dezho o-unan evit stummañ diouti an emsav micherour.

Disheñvel eo ar Gomunourion diouzh ar c'hostezennoù micherour all war daou boent hepken:

- 1 E stourmadoù broadel ar broleterion a lies bro e lakaont a-wel hag e penn-kont al lazioù boutin d'ar broleteriezh a-bezh, kuit a vroadelezh;
- 2 Er prantadoù diseurt eus emdroad ar stourm etre proleterion ha bourc'hizion, e terc'hoezont e pep mare hag e pep lec'h laz an emsav a-bezh.

Bez' ez eo ar Gomunourion enta, diouzh un tu hag ent embregel, lodenn aracketañ ha youlekañ ar c'hostezennoù micherour a bep bro, al lodenn a ro lañs d'an holl re all; diouzh un tu all hag ent damkanel, ez int trec'h da beurrest ar broleteriezh dre ma vezont difazi hent, aozoù hadisoc'hoùpellañ an emsav proleterel.

Heñvel eo amkan kentañ ar Gomunourion ouzh hini ar c'hostezennoù proleterel all: enframmañ ar broleterion en ur renkad, diskar mestroni ar vourc'hizelezh, lakant ar broleteriezh da gemer ar galloud politikel.

Meizadurioù damkanel ar Gomunourion n'int ket diazezet tamm ebet war vennozioù pe war bennaennoù bet ijinet pe dizoloet gant an darvez bedreizhour-mañ-bedreizhour.

Eztaolijñ ne reont ken amplegadoù hollekur gwir stourm a renkad, un argerzh istorel o c'hoarvezout dirak hon daoulagad. Freuzidigezh ar c'heñverioù-perc'hennañ a-vremañ ned eo ket azon ar Gomunouriezh.

Sujet eo bet renad ar berc'hentiezh en amzer dremenet da gemmoù istorel dizehan. Freuzañ ar berc'hentiezh c'hladdalc'hel a reas anDispac'h gall da skouer, evit mad ar berc'hentiezh vourc'hizel.

Azon ar Gomunouriezh n'eo ket freuzidigezh ar berc'hentiezh dre vras, met freuzidigezh ar berc'hentiezh vourc'hizel. Ar berc'hentiezhprevez bourc'hizel arnevez zo ar furm glokañ eus ar mod-kenderc'hañ ha -perc'hennañ, diazezet war ur gourzhensbadur a renkad, war gervoerezh ar muianiver gant ur bihanniver. E-se emañ ar Gomunourion e gwir da grennañ o c'holennadurezh er sturienn-mañ: freuzidigezh ar berc'hentiezh prevez.

Rebechet ez eus bet ouzhimp, Komunourion, klask freuzañ ar gwir da biaoañ ur berc'hentiezh personel evel frouezh al labour hiniennel, ar berc'hentiezh-mañ o vezañ, a-hervez, maen-sol pep frankiz, pep oberiantiz ha pep dizalc'hted personel.

Ar berc'hentiezh hiniennel, frouezh al labour hag an dellid' hag anv a rit eus perc'hentiezh an dornvezhour pe ar c'houer munut, ur stumm perc'hentiezh a veze kavet a-rack ar stumm bourc'hizel. Freuzañ hounnezh, n'eus ket eskomm; bet eo bet ha bez' e vez distrujet bemdez gant emled ar greanterezh.

Anv a rafec'h eus perc'hentiezh prevez bourc'hizel arnevez? Daoust hag al labour gopret avat a grou perc'hentiezh evit al labourer? Tra ebet. Krouiñ a ra kevala, eleze ur seurt perc'hentiezh a gorvo al labour gopret ha na c'hell kreskiñ nemet ha kenderc'hañ a rafe muioc'h a labour gopret d'e gorvoiñ a-nevez. Diazezet eo ar berc'hentiezh en he stumm a-vremañ war an enebadur etre Labour ha Kevala. Taolomp ur sell war bep hini.

Bezañ ur c'hevalour zo kement ha kaout ur saviad kevredigezhel, ha n'eo ket hiniennel hepken, er c'henderc'hañ. Ur c'henderc'had-stroll eo ar c'hevala, ha ne c'hell bezañ lusket nemet dre genobererezh meur a ezel, hag en dibenn dre genobererezh kement ezel zo er gevredigezh.

E-se ned eo ket ar c'hevala ur galloud personel, met ur galloud kevredigezhel. Pa vez treuzfurmet ar c'hevala e kenberc'hentiezh, e perc'hentiezh holl izili ar gevredigezh, n'eo ket ur berc'hentiezh hiniennel a vez treuzfurmet e perc'hentiezh kevredigezhel. Dremm gevredigezhel ar berc'hentiezh a vez kemmet hepken. Koll a ra he dremm renkadel.

Gwelomp bremañ al labour gopret.

Priz keitat al labour gopret zo ar gopr izek, eleze sammad ar madoù-bevañs ret-holl da zerc'hel bev ar micherour evel micherour. Dre-se ar pezh a berc'henn ar goprad dre berzh e labour a dalvez dezhañ da chom bev. Ned omp ket mennet tamm ebet da freuzañ ar perc'hennadur-se eus kenderc'had al labour, ur perc'hennadur oc'h notren dalc'hadur ha nevezadur ar vuhez hep lezel dreistad ebet a rofe beli war labour an dud all. Ned omp mennet nemet da freuzañ al lastez mod-perc'hennañ ma vev ar micherour hepken evit kreskiñ ar c'hevala ha ma vez aotr-

eet da vevañ e kement hepken ma'z eo spletus d' ar renkadel-ren.

Er gevredigezh vourc'hizel ned eo al labour bev nemet un tu da greskiñ al labour daspugnet. Er gevredigezh komuncour ned eo al labour daspugnet nemet un tu da frankaat, da binvidikaat, da gaeraat buhez al labourer.

Er gevredigezh vourc'hizel e ren an tremenedwar ar bremañ; er gevredigezh komuncour, ar bremañ eo a ren war an tremened. Er gevredigezh vourc'hizel, ez eo ar c'hevala dizalc'h ha personel tra m'en deus an hini a labour na dizalc'hted na personelezh.

Hag evit ar vourc'hizion, lemel seurt stad a draoù zo kement ha lemel hiniennelezh ha frankiz. Gant gwir abeg. Rak freuzañ an hiniennelezh vourc'hiz, an dizalc'hted vourc'hiz, ar frankiz vourc'hizeo a zo e kont.

En azioù ar c'henderc'hañ bourc'hizel a-vremañ e talvez frankiz kement ha frankiz ar c'henwerzh, frankiz ar prenañ hag ar gwerzhañ.

Padal mar steuz an nevid, e steuz ivez frankiz an nevid. An anv a frankiz hag an holl "gomzoùflour" all eus hon bourc'hizion n'eo deus ur ster - mar o deus - nemet e dargemm gant an nevid huallet, gant kenwerzherion heudet ar Grennamzer, hogen n'eo deus ster ebet e-keñver freuzidigezh komuncour an nevid, renad bourc'hizel ar c'henderc'hañ hag ar vourc'hizalezh hec'h-unan.

Spouronet oc'h peogwir omp mennet da freuzañ ar berc'hentiezh prevez. Padal freuzet eo ar berc'hentiezh prevez endeo en ho kevredigezh a-vremañ evit an nav dekvedenn eus hec'h izili; bez' ez eusanozhi evideoc'h dres peogwir n'eus ket evit an nav dekvedenn all. Rebec'h a rit dimp enta mennout freuzañ ur

stumm perc'hentiezh ha na c'hell bezañ anezhi nemet mar bez divadoù ar muieniver brasañ eus an dud.

En ur ger, e roechit dimp mennout freuzañ ho perc'hentiezh ha dres, setu ar pezh a vennomp.

Adalek ar mare ma ne c'hell mui al labour bezañ treuzfurmet e kevala, en arc'hant pe e leve, en ur c'halloudezh kevredigezhel a c'haller unpiacuañ, el-eze diwar ma ne c'hell ket mui ar berc'hentiezh prevez bezañ treuzfurmet e perc'hentiezh vourc'hizel, e kevala, neuze, emezoc'h, e steuz personelezhmab-den.

Anzav a rit enta, pa gomzit eus personelezhmab-den, e rit anv hepken eus ar bourc'hiz, eus ar perc'henn bourc'hiz. Ar bersonelezh-se eo a zleomp en em zizober diouti. Ne lam ar Gomonouriezh digant den ar gwir da berc'hennañ kenderc'hadoù ar gevredigezh; lemel a ra hepken ar galloud da sujañ labour ar re all dre berzh ar perc'hennadur-se.

Arbennet ez eus bet ez ehano pep labour hag e reno al leziregezh war ar bed-holl mar bez freuzet ar berc'hentiezh prevez.

Ha gwir e vo, mil bell 'zo e ve get ar gevredigezh vourc'hizel da get diwar leziregezh; rak ar gevredigezh-se ar re a labour ne c'hounezont seurt hag ar re a berc'henn tra pe dra ne labouront tamm. Ned eo an arbennadenn nemet un neuz all eus an daotologiezh-mañ; ne c'halle ket bezañ a labour gopret ken pa na vo mui a gevala.

Kement abeg kavet er mod komuncur da genderc'hennañ ha da berc'hennañ ar c'henderc'hadoù danvezel zo bet kavet ivez er mod komuncur da genderc'hennañ ha da berc'hennañ oberoù ar spered. Dres evel ma'z eo evit ar bourc'hiz steuziadur ar berc'hentiezh renkadel kement hag ur steuziadur eus ar c'henderc'hennañ end-eeun, heñvel-dra ez eo evitañ steuziadur ar sevenadur

renkadel kement ha steuziadur pep sevenadur.

Hogen arabat deoc'h daelañ ganimp keit ha ma varnit freuzidigezh ar berc'hentiezh vourc'hizel e c'hoantaomp diwar-bouez ho meizadoù bourc'hizel war ar frankiz, ar sevenadur, ar gwir, h.a. Ned eo ho mennozioù end-eeun nemet an disoc'h eus ho renad - kenderc'hennañ ha -perc'hennañ bourc'hizel, evel ma'z eo ho kwir youl ho renkad lakaet da lezenn voutin, ur youl a zo un estaol diwar azioù-bevañ armerzhel ho renkad.

Ar meizadur emgar ho laka d'ober saveleannoù peurbadel eus an natur hag ar poell eus ho keñverioù-kenderc'hennañ ha -perc'hennañ - keñverioù tremeniat o steuziañ gant emdroadur ar c'henderc'hennañ e-unan - ar meizadur-se zo boutin da gement renkadenn a zo bet en ho rack. Ar pezh a welit anat e perc'hentiezh an henamzer, ar pezh a zegemerit evit ar berc'hentiezh c'hladalc'hel, a nac'hit henn gwelout pa vez anv eus ho perc'hentiezh vourc'hizel.

Freuzañ ar familh! Lroug a ya er re arackastañ o klevout ar c'hinnig euzhus-se eus ar Gomonourion. War betore sol eo diazezet ar familh vourc'hiz a-vremañ? War ar c'hevala, war an hely prevez. Ar familh-se, n'eus anezhi en he furm glokañ, nemet er vourc'hizelezh. Da ziwann dezhi emañ ezvezañs ar familh e-touez ar broleterion hag ar gwerzhorezh - korf.

Steuziañ a ray ar familh vourc'hizeldrezihec'h-unan pa steuzio he diwanenn, ha steuziañ a ray an eil hag eben pa steuzio ar gevalaouriezh.

Ha tamall a rit dimp mennout herzel ouzh korv-oerezh ar vugale gant o zud? Anzav a reomp bezañ kablus eus an torfed-se.

Youlskoude, a lavarot-hu, e freuzomp al liamm-

où nesaekañ pa erlec'hiomp an desavadur dre ar gevredigezh ouzh an deskadurezh dre ar familh.

Hag ho tesavadur, daoust ha n'eo ket frouezhar gevredigezh? Frouezh an sozioù kevredigezhel ma savit ho pugale enno, dre berzh emell eeun pe am-eeun ar gevredigezh, dre ar skolioù, h.a.?

Ar Gomunourion n'o deus ket ijinnet lec'h ar gevredigezh en deskadurezh; klask kemmñ al lec'h-se ne reont ken, ha klask sachañ an deskadurezh e-maez a levezon ar renkad-ren.

Seul hegusoc'h e teu da vezañ cholori ar vourc'hizion war ar familh hag an desavadur, war nesaeged ar bugel hag e dud, ma vez troc'het, dindan levezon ar greanterezh, an holl ereoù tiegezhel e-touez ar broleterion, ha ma vez graet eus o bugale traezoù-kenwerzh hag araezioù-labour hepmuiken.

Hogen ar vourc'hizelezh a-bezh o krial forzh a-gor: "Met c'hwi, ar Gomunourion, a fell deoc'h boutinaat ar merc'hed!"

Ar bourc'hiz a wel en e wreg un araez - kenderc'hañ. Klevout a ra e vo boutinaat korvoerezh an araezioù-kenderc'hañ, hag, evel just, ne c'hell nemet krediñ ez eo tenket d'ar merc'hed bezañ boutinaet ivez.

N'en deus ket an disterañ soñj ez eus anv da dennañ ar merc'hed eus ar saviad araezioù-kenderc'hañ m'emañ bremañ.

A-hend-all n'eus netra farsusoc'h eget konnar vertuzius ar vourc'hizion ouzh boutinadur ar merc'hed da vezañ ensavet, gouez dezhe, gant ar Gomunouriezh. N'eo ket dav d'ar Gomunourion ensaviñ boutinadur ar merc'hed: a-holl-viskoazh pe dost ezeus bat anezhañ.

Ar vourc'hizion, ouzhpenn kaout gwraez ha

merc'hed ar broleterion dindan o dorn, ha hep kontañ ar gisti kefridiel, a gav ar brasañ plijadur oeh en em doganiñ kenetrezo.

E gwir ez eo an dimeziñ bourc'hizel boutinadur ar merc'hed, ha dre-se ar pezh a c'hallfed rebechar muiañ d'ar Gomunourion eo c'hoantaat savelañ, e lec'h ur boutinadur kuzh pilpous ur boutinadur digor ha kefridiel. Anat-mat eo a-hend-all e tegasfe dre ret lamidigezh ar renad-kenderc'hañ a - vremañ lamidigezh boutinadur ar merc'hed diwanet eus arrenad-se, eleze ar gwerzherezh-korf, ken prevez, ken foran.

Rebechet e vez c'hoazh d'ar Gomunourion c'hoantaat freuzañ ar broioù hag ar vroadelezh.

Ar vicherourion n'o deus bro ebet. Ne c'haller ket lemel diganto un dra n'o deus ket. Dre ma rank ar broleteriezh gounit da gentañ-holl ar galloud politikel, dre ma rank dont da vezañ renkad-ren ar vroad, ha bezañ ar vroad hec'h-unan, ez eo broadel dre-se, n'eo ket e ster bourc'hizel ar ger avat.

Mui-ouzh-mui e steuz ondeo ar bevennoù broadel hag an enebiezhoù etre ar pobloù en arbenn eus diorreadur ar vourc'hizelezh, eus frankiz ar c'henderc'hañ, eus an nevid-bed, eus peurunvanidigezh ar c'henderc'hañ hag eus an sozioù-bevañ o tinaouiñ diouto.

Mestroniezh ar broleteriezh o lakay da steuziañ buanoc'h c'hoazh. Unan eus ampegadoù kentañ dishualadur ar broleteriezh ez eo ar genoberiezh er broioù sevennet da vihanañ.

A-feur ma vo freuzet korvoerezh mab-den gant mab-den e vezo freuzet ivez korvoerezh ur vro gant ur vro all. A-feur ma steuzio an enebiezh renkadel er vroad ez ay da get an enebouriezh etre ar broioù.

N'eo ket dellezek a galz preder an tamalloù graet d'ar Gomunouriezh diouzh ur savboent relijiel, prederouriezhel, ha dre vras diouzh ur savboent kealiadel.

Ha ret eo bezañ ken lemm-se a speredevit kompren e kemm mennoziou, maizadurioù ha kealioù an dud, en ur ger o emskiant, gant kement kemm o c'hoarvezout en o azioù-bevañ, o darempredoù kevredadel, hag o c'hodvuhez?

Petra a ziskouez istor ar mennoziou-hend-all nemet e kemm dremm ar c'henderc'h speredel bep ma kemm ar c'henderc'h danvezel. Mennoziou ar renkad-ren eo bet mennoziou-stur pep oadvezh.

Pa gomzer eus mennoziou o reverzhiañ ur gevredigezh, e verker hepken ez eo bet krouet e-barzh ar gevredigezh kozh elfennoù ur gevredigezh nevez, hag ez a a-unan steuziadur ar mennoziou kozh ha steuziadur an azioù-bevañ kozh.

Pa edo an henved war e dremenvan e voetre'h-et an hengraveziou gant ar Gristeniezh. Pa gilas ar mennoziou kristen dirak mennoziou an arakaat en 18th kantved, edo ar gevredigezhc'hladdalch-el o ren ar c'hrogad diwezhañ ouzh ar vourc'hizelezh, dispac'hel evit neuze. Na vos mennoziou ar frankiz-kredenn hag ar frankiz-kravez nemet an ez-taol eus ren ar frankkevezerezh war dachenn ar gouzoud.

"Emichañs, a lavarer, eo bet kommet ar mennoziou kravezel, divezel, prederouriezhel, gwiriel, e-ser an emdroad istorel. Hogen padout a rae ar gravez, an divezouriezh, ar prederouriezh, ar politikerezh, ar gwir a-dreuz d'an treuzfurmadurioù.

Ouzhpenn-se, ez eus gwirioneziou peurbadel e-

giz ar Frankiz, ar Reizhded, h.a., boutin da bep renad kevredigezhel. Padal freuzañ ar gwirioneziou peurbadel a ra ar Gomunouriezh, freuzañ ar relijion hag an divezouriezh, e-lec'h reiñ ur sol nevez dezho; e-se ez a war enep da bep emdroad istorel diagent."

Petra dalvez an tamall-se? Istor pep kevredigezh diagent zo bet diorreadur un enebiezh renkadadel, un enebiezh a wiskas stummoù liesseurt hervez ar mareoù.

Hogen ne vern pe stumm o defe gwisket ez eus un dra boutin d'an holl vareoù: korvoerezh un darn eus ar gevredigezh gant un darn all. N'eo ket souezh e kavfed enta stummoù boutin da emskiant kevredigezhel an oadvezhioù kent, daoust d'o diseurtiezh ha d'o liesdoare, mennoziou hollek, na c'hellont ket steuziañ krenn, nemet steuziañ krenn a rafe an enebiezh a renkad.

An dispac'h komunour zo an troc'h donañ diouzh renad henvoazel ar berc'hentiezh; n'eo ket marzh mar degas e emdroadur un troc'h krenn diouzh ar mennoziou henvoazel.

Hogen lezomp a-gostez an arbennadennoù a ra ar vourc'hizion d'ar Gomunouriezh.

Gwelet hon eus uheloc'h ez eo pazenn gentañ dispac'h ar vicherourion sevel ar broleteriezhbetek live ar renkad-ren, gounit emgann ar werinouriezh.

Arverañ a ray ar broleteriezh he dreistbeli politikel evit sachañ tamm-ha-tamm an holl gevala digant ar vourc'hizelezh, evit kreizennañ an holl araeziou - kenderc'hañ etre daouarn ar Stad, eleze etre daouarn ar broleteriezh frammet e renkad-ren; ha da greskiñ ar buanañ gwellañ hollad an nerzhoù-kenderc'hañ.

Er pennderoù, evel just, ne c'hell kement - se bezañ graet nemet dre alcubiñ en un doare aotrouniek

ar gwirioù a berc'hentiez hag ar renad-kenderc'hañ
bourc'hiz; dre hentennoù enta a ziskouez bezañ di-
vastus ha dic'hallus e-keñver armerzh, met en em
zistremen e-ser argerzh-diskar an urzh kozh, diziou-
erus ma'z int evit eilpenañ ar mod-kenderc'hañ en
e bezh.

Evel just e vo disheñvel an hentennoù hervez
ar breioù.

Er re aracketañ evelato e c'hallor arverañ an
darbaroù-mañ:

- 1 Freuzañ perc'hentiez ar glad hag arverañal lev-
ecù evit an ezhommoù foran;
- 2 Telloù eun pounner ha dereziek war ar c'horvor-
der;
- 3 Freuzañ ar gwir-hêrezh;
- 4 Diberc'hennañ an divroidi hag ar gilverzed;
- 5 Kreizennañ ar C'hred etre daouarn ar Stad, dre
hanterezh ur bank broadel, a vo e gevala perc'h-
entiez-Stad, dezhañ unpioquerezh rik;
- 6 Kreizennañ an holl araezioù-kehentiñ etre daou-
arn ar Stad;
- 7 Kreskiñ ar greantioù hag an araezioù-kenderc'hañ
piauet gant ar Stad; trevekat ar fraostegi, gwell-
aat an atiloù hervez ur steuñv hollek;
- 8 Ensaviñ al labour ret evit an hall. Krouiñ arma-
doù greantel;
- 9 Kenurzhiañ labour gouezel ha labour greantel ;
kemer darbaroù da ziverkañ tamm-ha-tamm andiforc'hiz
ioù etre kêrioù ha maezioù, dre ingalañ ar boblañs
er vro;
- 10 Diazezañ an deskadurezh foran ha digoust evit an
holl vugale. Freuzañ labour ar vugale er greanter-
ezh evel m'en pleustrer hiziv. Kenreizhañ an desk-
adurezh diouz ar c'henderc'h danvezel, h.a...

Ur wech ma vostaiziet, en dibenn, an enebiezh-
où renkadel ha ma vo kreizennet pep kenderc'hañetre
daouarn kevredad divent ar vroad a-bezh, e kollo ar
galloud foran e zremm bolitikel. Ned eo ar galloud
politikel, e gwirionez, nemet galloud frammet ur
renkad evit gwaskañ unan all. Mar rank ar broleter-
iezh, e-ser un emgann ouzh ar vourc'hizelezh, en em
frammañ en ur renkad, mar deu dre an dispac'h da
vezañ ur renkad-ren, ha mar dispenn da heul dre an
nerzh ar renad-kenderc'hañ kozh, e tispenn war un
dro amplegadoù an enebiezh etre renkadoù, ar renk-
adoù o-unan dre vras ha, dre-se end-eeun, he mestr-
oniezh dezhi evel renkad.

E-lec'h ar gevredigezh vourc'hizel kozh gant
he renkadoù hag hec'h enebiezhoù renkadel, e sav ur
c'hevredadur ma'z eo diorreadur rez pep hiniempleg-
ad diorreadur rez an holl.

LIZHERADUR SOKIALOUR HA KOMUNOUR

1. Ar sokialouriezh kilstourmera) Ar sokialouriezh c'hladalc'hel

En arbenn eus e savlec'h istorel e voe brientinelezhioù Frañs ha Saoz douget da skrivañ flemm-skridoù enep ar gevredigezh vourc'hizel arnevez. Da geñver dispac'h gall gouere 1830, da geñver birvilh an Adreizhadur ("Reform") saoz, e voent faezhet ur wech ouzhpenn gant al lastez renkad vac'hom-se. Diwar neuze e oa echu evito ar stourm politikel. Ne chome ganto nemet emgannañ gant ar bluenn. Hogen war dachenn al lizheradur e oa aet didalvoud frazennadurezh kozh an Assavidigezh (6).

Evit dedennañ an dud e rankas ar vrientinelezh lezel a-gostez, evit doare, he laziñ-hi ha tamall ar vourc'hizelezh en anv ar renkad vicherour korvoet. E-giz-se e kavas dic'haou o kanañ goap ouzh he mestr nevez hag o fringoliñ e pleg e skouarn diouganou kañvaouüs a-walc'h.

Evel-se e voe ganet ar sokialouriezh c'hladalc'hel, leñverezh evit an hanter ha goaperezh evit an hanter all, heklevioù an tremened ha krouz an dazont tro-ha-tro. Mar skoe eeun a-wechoù e kalon ar vourc'hizelezh dre he burutellerezh c'hwerv, lemm ha godisus, e veze bepred lu an dic'halloudme chome ar vrientinelezh da gompren kerzh an istor arnevez.

Evit dedennañ ar bobl e touge an Aotrounez-se bisac'h ar c'hlaser-bara da vanniell, ar bobl avat

kellies gwech ma tostaas, a verzas ar skoedoù gladdalc'hel kozh a ginkle o revr, hag a dec'has gant c'hoarzhadennoù uhel ha difeson.

Gant lod eus ar reizhvelielourion c'hall hag eus "Saoz Nevez" e teuas an arvest-se.

Pa fell d'ar c'hladalc'helourion diskouez e oa disheñvel ar mod-korvoiñ gladdalc'heldiouzh hini ar vourc'hizion, ez ankouant un dra hepken: e kase ar gladdalc'h e gorvoerezh en amveziadoù hag en azoioù disheñvel-bras ha dispredet-rik hiziv. Pa verkont ne oa ket eus ar broleteriezh arnevez e grez ar renad gladdalc'hel, ez ankouant undra hepken: ez eo bet ar vourc'hizelezh an disoc'h ret eus o frammadur kevredigezhel end-eeun.

A-du-rall, e kuzhont ken nebeut kilstourmegezh o abegadennoù ma tamallont dreist-holl d'arvourc'hizelezh bezañ o tiorren, dindan he renad, ur renkad a ray d'an urzh kevredigezhel kozh tarzhañ en he fezh.

Rebec'h a reont d'ar vourc'hizion muioc'h bezañ krouet ur broleteriezh dispac'hel eget bezañ krouet ar broleteriezh dre vras.

E-se, er stourm politikel e kemeront perzh obieriant e kement darbar destrizhus divizet enep d'ar renkad vicherour. Hag en o buhez pemdeziek, en desped d'o frezegennoù pompadus, e plegont da zastum an avaloù acour kouezhet eus gwezenn ar greanterezh, ha da drokañ ar fealded, ar garantez hag an enor ouzh gwerzh leus ar gloan, ar boetrabez hagar gwinardant (7).

Evel ma ouzas a-viskoazh ar beleg hag aotrou an dalc'h bale dorn-ouzh-dorn, e oar ar sokialouriezh kloerel bale e-ser ar sokialouriezh c'hladalc'hel.

Netra aesoc'h eget reiñ ul liv sokialour d'an embleustrerezh kristen. Daoust ha n'he deus ket ar Gristeniezh emsavet ivez enep ar berc'hentiezh prevez, an dimeziñ, ar Stad? Hag en o lec'h, erbed-et ar garitez hag ar baourentez, an dizemezeded ha gwanadur ar c'horf, buhez ar gouent hag an Iliz? Ned eo ar sokialouriezh kristen netra nemet dour benniget a dalvez d'ar beleg da gensakrañ drouk-rañs ar brientin.

b) Ar sokialouriezh vihanvourc'hizel

Estreget ar vrientinelezh c'hladdalc'hel a zo bet rivinet gant ar vourc'hizelezh, renkadoù all a vez o tizeriañ er gevredigezh vourc'hizel arnevez. Er broioù ma chom amziorreet ar greanterezh hag ar c'henwerzh; e kendalc'h ar renkad-se da grakvevañ e-kichen ar vourc'hizelezh vleunius.

Er broioù ma ra berzh ar stuzegezh arnevez ez eus diwanet ur renkad nevez a vourc'hizion vihan o vranškellat etre ar vourc'hizelezh hag ar broleteriezh; darnad klokaus d'ar vourc'hizelezh, e vez nevezet dizehan; dre berzh ar c'hevezerezh avat e vez skrapet dizehan an hiniennoù hec'h ampar er broleteriezh; muic'h zo, bep ma kresk ar greanterezh, e testa ar pred ma'z ay ar renkad-se da get evel darnad emren eus ar gevredigezh arnevez, o lezel he lec'h er c'henwerzh, en ijinerezh, hag er gounezerezh gant merourion hag implijidi.

Er broioù evel Frañs ma'z eo kouerionouzhpenn en hanter eus ar boblañs ez eo natur m'o defe skrivagnerion o tifenn ar broleterion enep d'ar vourc'hizion kemeret dezverkoù bihanvourc'hizel ha koueridel evit barn ar renad bourc'hizel, ha savet a-du gant ar vicherourioù diouzh savboent ar

vourc'hizion vihan. Evel-se e tiwanas ar sokialouriezh vihanvourc'hizel. SISMONTI eo penn-skol al lizheradur-se e Frañs hag e Saoz war un dro.

Gant spiswel e tezrannas ar skol-se displevaroù diabarzh ar renad-kenderc'hañ arnevez. E tiskulias pilpouzerezh an armerzhourion en difenne. E prouas direndael gweredoù drastus an ardivinkelezhha rannadur al labour, tolpadur ar c'hevalaoù hag ar glad, an dreistkenderc'h, an enkadennoù, diskar didec'hus ar vourc'hizion vihan hag ar gouerion, reuzeudigezh ar broleterion, ar reustl er c'henderc'hañ, an digevatalderioù mezhus e dasparzh ar pinvidigezhioù, ar brezel-diouennañ etre ar riezoù greantel, linkridigezh ar buhezegezhioù kozh, al liammoù kerentiadel kozh, ar broadelezhioù kozh.

En he lodenn yael e fell d'ar sokialouriezh-se pe adstabilioñ an araezioù kozh a genderc'h hag a eskemm, ha war un dro ar renad-perc'hennañ kozh hag ar gevredigezh kozh en he fezh, pe neuze sterniañ dre-nerzh an araezioù-kenderc'hañ hag -eskemman arnevez e-barzh framm strizh ar renad-perc'hennañkozh o deus torret, na c'hellent ket na derriñ. En eil mod hag egile, ez eo ar sokialouriezh-se kilatourmer hag utopek war un dro. Evit an ijinerezh, ar renad korfuniadel; evit ar gounezerezh, ar renad uhel-dadel: setu he disentez.

Er prantad diwezhañ eus hec'h emdroadur, pa voe drastet he hunvre gant an darvoudoù, e kouezhas ar skol-se e geunioù an diantelladur.

k) Ar sokialouriezh alaman pe "wir" sokialouriezh

Al lizheradur sokialour ha komunour gall, diwanet dindan wask ur renkad-ren vourc'hiz, estaol

lennegel ur stourm ouzh mestroni ar renkad-se, a
voe enbroet en Alamagn er mare ma stage bourc'hiz-
ion ar vro-se d'en em sevel ouzh an diharzveli
gladdalc'hel.

Filozoferien, damfilozoferien ha "beaux es-
prits" alaman a blacuias war al lizheradur - se , -
oc'h ankouaat hepken ne oa ket bet enbroet an soz-
ioù-bevañ gall war un dro gantañ. E-keñver an soz-
ioù-bevañ alaman e kolle ar skridoù-se pep talv-
oudegezh pleustrek gweredel hag e wiskjont un neuz
lennegel rik. Anadiñ ne rejont ken evel imbroudad-
urioù euvet war sevenidigezh natur mab-den. E - se
evit prederourion alaman an 18th kantved, ne veze
arc'hadurioù an Dispac'h gall kentañ nemet arc'h-
adurioù ar "pocell embregel" dre vras, ha diskouez-
adurioù youl ar vourc'hizion dispac'her ne raont,
gouez dezho, nemet eztaoliñ lezennoù aryoulc'hlan,
ar youl evel ma tle bezañ, ar youl wir zenel.

Labour nemetañ al "literari" alaman e voe
kendeuziñ ar mennozioù gall nevez gant o emskiant
prederouriezhel kozh, pe gentoc'h perc'hennañ ar
mennozioù gall diouzh o savboent prederouriezhel.

O ferc'hennañ a rejont evel ma perc'henner ur
yezh estren, dre an treiñ.

Gout a ouzer penaos e c'holoer venec'h dorn-
skridoù oberoù klasel an heñamzer bagan gant brud
amoet ar sent katolik. Ar c'hontrol a reas al lit-
erari alaman e-keñver al lizheradur gall. Silañ a
rejont o ansterioù prederouriezhel dindan ar skrid-
orin gall. Da skouer, dindan dezrannerezh gallren-
ad an arc'hant e skrivjont "arallekadur natur mab-
den"; dindan dezrannerezh gall ar Stad vourc'hizel
e skrivjont "didronadur an hollveziadelezh difet-
is", h.a. Seurt erlec'hiadenn eus ur frazennadur-

ezh alaman ouzh an displegadurioù gall, a vadezjont:
"Prederouriezh an ober", "Gwir sokialouriezh", "ski-
ant alaman ar sokialouriezh", "kantreizhadur preder-
ouriezhel ar sokialouriezh", h.a..

E-giz-se e voe droukspazhet al lizheradur sok-
ialour ha komunour gall. Ha dre ma paoueze, estre
daouarn an Alamanned, a verkañ stourm ur renkad ouzh
unan all, e kemerjont lorc'h o vezañ distremenet ar
strizhdad c'hall hag o vezañ difennet n'eo ket ezh-
ommoù beziadel, hogen an "ezhomm a wided"; n'eo ket
lazioù ar proleter hogen lazioù mab-den, lazioù an den
dre vras, an den nad eo eus renkad ebet, eus bed
ebet, n'eus anezhañ nemet en oabl latarek ar faltazi
filozofel.

Ar sokialouriezh alaman, a gemere kement a-ze-
vri he fleustradennoù skolek diampart hag a emanne
he gwall varc'hadourezh e-giz ur jipsianez, a yeas
avat tamm-ha-tamm diouti he diantegezh brizhlennek.

Siriusoc'h e teuas da vezañ stourm ar vourc'h-
izion alaman hag ar vourc'hizion brusian pergen ouzh
ar vrientinion c'hlladdalc'hel hag an unpenniezh di-
harzveli,- en ur ger ar stourm frankizour.

An dro hirc'hortozet a gavas eno ar "wir" sok-
ialouriezh da sevel arc'hadurioù kevredigezhel ouzh
al luskad politikel; an anacueoù boas a c'hallas
doug enep ar frankizouriezh, ar renad derc'houezel
ar gevezouriezh vourc'hizel, frankiz vourc'hizel ar
wask, ar gwir bourc'hizel, ar frankiz hag ar gevatal-
ded vourc'hizel; lavarout a c'hallas d'ar yoc'h n'he
doa netra da c'hounit ha pep tra da goll gant an em-
sav bourc'hizel. Heklev d'an dezrannerezh gall, ar
sokialouriezh alaman a ankouae e kouls en doa an
dezrannerezh-se da amplegadur ur gevredigezh vourc'h-
izel arnevez, aczioù-bevañ o klotañ ganti hag ur

Vonreizh politikel azas outi,- ar pezh end-eeun he doa Alamagn da c'hounit c'hoazh.

Evit gouarnamantoù diharzveli Alamagn hag o amheuliadeg a veleion, a gelenourion, a zudjantil hag a vurevierion, e talvezas ar sokialouriezh-se da spontailh enep ar vourc'hizelezh alcubus.

He blaz milis a zeuas war an taolioù skourjez hag an tennoù fuzuilh a veze respont ar gouarnamantoù-se da emsevadegoù ar vicherourion alaman.

Mar deuas ar "wir sokialouriezh" da vezañ etre dacuarn ar gouarnamantoù un arm enep d' ar vourc'hizelezh alaman, e oa anezhi ivezmouezh eeun ul laz kilstourmer, laz ar vourc'hizion vihan alaman. Gwir diaz kevredadel ar renad politikel alaman eo ar renkad vihanvourc'hizel, herezh ar 16t kantved oc'h azdiwanañ dibaoez e stummoù diseurt abaoe.

Derc'hel ar renkad-se zo kement ha derc'hel ar renad a-vremañ. En argoll emañ dre berzh trec'h greantel ha politikel ar vourc'hizelezh vras, da heul tolpadur ar c'hevalaoù en un tu, dinodadur ur broleteriezh dispac'hel en tu all. Ar "wir sokialouriezh" a ziskouezas bezañ gouest d'ober o stal d'an daou du. En em ledañ a reas evel ur c'hleñved -red.

Gant stoufoù lijer ar poellata e kemeras ar sokialourion alaman ur gwiskamant frank, brodet gant bleunioù flour o helavarouriezh, intret gant glizh klouar an trivliadoù, a lakajent en-dre da gorf-eskern o "gwirionezioù peurbadel",- ar pezh a reas d' o marc'hadourezh kavout gwerzh estongant ar brenerion-se.

Dicouzh he zu, ar sokialouriezh alaman a veizas gwell-ouzh-gwell edo galvet da vezañ dremm bom-

padus ar vourc'hizelezh vihan-se.

Embann a reas ez eo ar vroad alaman ar vroad-skouer, hag al lonker-poulc'henn alaman an den-skouer. Da holl distervezioù an den-skouer-se e roas ur ster amguzh, uhel ha sokialour a rae dezho talvezout ar c'hontrol mik eus ar pezh e oant. Betek penn ez eas, o sevel enep d'an tech "distrujer garv" eus ar gomouriezh, oc'h embann e plave eviti, diuntsek, dreist pep stourm a renkad. War-bouez un nebeudig nemedenoù, an holl embannadurioù skritellet sokialour pe komunour a gaver en Alamagn hiziv zo eus al lizheradur hakr-se.

2. Ar sokialouriezh vourc'hizel

Dara eus ar vourc'hizion a glask parraat ouzh an direizhioù kevredigezhel a-benn startaat ar gevredigezh vourc'hizel.

Er rumm-se emañ an armerzhourion, an dengerourion, an denegourion, an dud a bled da wellaat planedenn ar renkad vicherour, da aczañ ar madoberezh, da zifenn al loened, da sevel breuriezhoù-dilontegzh, berr-ha-berr, kement liv 'zo a adreizhourion gambrek. Aet eur betek lakaat en o sav reizhiadoù klek eus ar sokialouriezh vourc'hizel. Menegomp da skouer Philosophie de la misère gant PROUDHON.

Ar sokialourion vourc'hiz a zegemer azioù-bevañ ar gevredigezh arnevez hep ar stourmoù hag an dañjerioù a zinaou dicute dre ret. Ar gevredigezh a-vremañ a zegemeront, met skarzhet diouti an danvezioù dispac'h ha dispenn a zo enni. Ar vourc'hizelezh a fell dezho kaout hep ar broleteriezh. Evel just ez empenn ar vourc'hizion ar bed ma renont evel ar gwellañ eus ar bedoù; ha diwar ar reizhadur konfortus-se e sav ar sokialourion vourc'hizel reizhiadoù klek pe glakoc'h. Pa gemennont d' ar broleteriezh kas da wir ar reizhiadoù-se ha dont tre er Jeruzalem nevez, ne reont nemet ha fedañ, en devoud, da chom evel m'emañ ar gevredigezh a-vremañ, hogen d'en em zizeber eus ar c'heal kasonius he deus anezhi.

Un eil furm a sokialouriezh, nebeutoc'h reizhiadek, pleustrekoc'h avat, a strivas da zistreiñ ar vicherourion diouzh pep ober dispac'hel, dre brouñ dezho n'eo ket eus treuzfurmadurioù politikel e teufe o mad hogen eus un treuzfurmadur en azioù o buhez danvezel, er c'heñverioù armerzhel. Pa gomz

a dreuzfurmiñ azioù ar vuhez danvezel avat, n'intent ket freuzadur ar renad-kenderc'hañ bourc'hizel,- seurt freuzadur oc'h amplegañ an dispac'h; hogen hepken kempennadurioù amaezhiadurel war ziazez ar c'heñverioù-kenderc'hañ bourc'hizel, kempennadurioù na gemmont enta netra er c'heñverioù etre Kevala ha Gopradelezh ha ne reont, d'armuañ, nemet digreskiñ evit ar vourc'hizelezh koust he mestroniezh hag esunaat kelliderezh ar Stad.

En he furm azas emañ ar sokialouriezh vourc'hizel pa na chom anezhi nemet un droienn stil.

Ar frankeskemm,- evit mad ar renkad vicherour! Gwirioù maltouterezh,- evit mad ar renkad vicherour! Toulloù-bac'h kellaouek,- evit mad ar renkad vicherour! Setu ger diwezhañ ar sokialouriezh vourc'hizel,- ar ger nemetañ he defe distaget a-zevri biskoazh.

Rak er gadarnadenn-mañ emañ ar sokialouriezh vourc'hizel a-bezh: bourc'hizion eo ar vourc'hizion,- evit mad ar renkad vicherour.

3 ar sokialouriezh hag ar gomunouriezh dezrannel- utepek

Amañ ne reomp ket anv eus an testennoù o deus roet da anaout arc'hadurioù ar broleteriezh en dispac'hioù bras arnevez, evel skridoù BABEUF, h.a.

Strivadennoù eeun kentañ ar broleteriezh evit difenn he lazioù renkadel, graet en un amzer a strafuilh hollek, p'eded e tiskar ar gevredigezh c'hladalc'hel, a c'hwitas dre ret, en arbenn eus ar stad eginel m'edo c'hoazh ar broleteriezh hec'hanan, hag e diouer amlegadoù danvezel he dishualidigezh a ranke gortez an oadvezh bourc'hizel evit bezañ. Al lizheradur dispac'hel a ambrouge seurt loc'hadoù kentañ eus ar broleteriezh zo dezhañ un endalc'h kilstourmer dre ret. Erbediñ a ra un emzioueriezh hollvedel hag ur gevatalouriezh c'hros.

Ne zinodas ar reizhiadoù sokialour ha komunour ent strizh, eleze reizhiadoù SAINT-SIMON, FOURIER, OWEN, h.a., nemet e prantad kentañ ar stourm etre proleteriezh ha bourc'hizelezh (prantad hon eus studiet c'hoazh, sl. I).

Aozourien ar reizhiadoù-se a wele ervat gourzhenebadur ar renkadoù hag ar gweredoù-dispenn a veze o labourat er gevredigezh vestronier hec'hanan. Hogen ne ziverzent er broleteriezh kentoderezh istorel ebet nag emsav politikel ebet.

O vezañ ma kresk gourzhenebadur ar renkadoù war un dre gant dicrreadur ar greanterezh, ne ziverzent ket muic'h amlegadoù danvezel dishualidigezh ar broleteriezh, hag e stagont da glask ur skiant kevredigezhel, savelennoù kevredigezhel, abenn krouiñ an amlegadoù-se.

Ouzh an obererezh kevredigezhelezh erlec'hiont o intrudu dezho; ouzh amlegadoù istorek an dis-

hualidigezh, amlegadoù faltaziek; ouzh frammidigezh pazennacuek hag emdardhek ar broleteriezh e reizh renkad, ur frammidigezh goveliet ganto eus ar gevredigezh. Evito emañ dazont ar bed e - barzh daou dra: ober bruderezh ha lakaat o raktresoùkevredigezhel da dalvezout.

O sevel ar raktresoù-se avat e ouzont e tifennont kent pep tra lazioù ar renkad vicherourpa'z eo hi a c'houzañv ar muiañ. Evito, n'eus eus ar broleteriezh nemet evel renkad o c'houzañv armuñ.

Dre ma oa en egin c'hoazh stourm ar renkadoù avat, dre berzh ivez o savlec'h kevredigezhel, ez eo techet ar sokialourion-se da grediñ emaint dreist da bep gourzhenebadur renkadel. C'hoantaat a reont gwellaat azioù danvezel holl izili ar gevredigezh, zoken ar re vrientekañ. Da heul, ne baouezont ket a engervel ar gevredigezh a-bezh hep diforc'h a renkad, oc'h en em dreiñ zoken aliesoc'h etrezek ar renkad-ren. Rak, evit gwir, ez eo a-walc'h meizañ o reizhiad evit anzav ez eo ar gwellañ raktres evit ar wellañ gevredigezha c'hell bezañ.

Dre-se e tistadont pep ober politikel ha dreist-holl pep ober dispac'hel; o fal a strivent da dizhout dre arazioù peoc'hiek, hag un hent a glaskont toullañ d'an aviel kevredigezhel nevez dre nerzh ar skouer-vat ha dre gorrarnodoù a zo evel just kemend-all a c'hwitadennoù.

Taolennadur faltaziek ar gevredigezh da zont, d'ur mare ma kompren ar broleteriezh, amzioreet c'hoazh, he savind en un doare faltaziek, a glot gant c'hoantadoù emdardhek kentañ ar vicherourion d'un treuzfurmatur klok eus ar gevredigezh. Koulskoude e kaver e-barzh ar skridoù sokial-

our ha komunour elfennoù un dezrannerezh. Argadiñ a reont ar gevredigezh e ren en he diazezoù endeeun. Poursaset e deus enta, en e amzer, un danvez sklerijenn a bouez d'ar vicherourion. An amkanioù a ginnigent evit ur gevredigezh da zont, - lemel ar gourzhenebadur etre kêrioù ha maezioù freuzañ ar familh, ar goumid prevez hag al labour gopret, embann ar gendoniezh kevredigezhel, diren roll ar Stad d'ur mererezh hep-mui eus ar c'henderc'hañ, - en holl amkanioù-se ne reont nemet diouganañ steuzidigezh ar gourzhenebadur etre renkadoù, a ze a-vec'h e tinodiñ, ha na anavez an acourion reizhiadoù nemet an diskeudoù dispis anezhi. E-se n'eus gant an amkanioù-se nemet un dalvoudegezh utopek evit e'heazh.

A-c'hinfeur emañ talvoudegezh ar sokialouriezh hag ar gomunouriezh dezrannel-utopek gant an diorreadur istorek. Bep ma kresk ha m'en em stumm ar stourm a renkad, ez a kuit pep pouez embregel, pep katreizhded damkanel diwar seurt doare d'en em c'horren dre ar faltazi dreist ar c'hrogad, seurt distaol faltaziek eus ar stourm. Setu perak, mar boe dispac'her e meur a geñver aczerion ar reizhiadoù-se, e sav e diskibion bepred luskadoù kilstourmer, rak aheurtet ee an diskibion da zerc'hel meizadurioù kozh e mistri e - dal da emdroadur istorek ar broleteriezh. Da heul e klaskont, hag e-se int kempoell, skcilhañ stourm ar renkadoù hag unvaniñ ar gourzhenebadoù. Padout a reont da hunvreal e dedalvezadur arnodel e utopiennoù kevredadel, - savidigezh falansterioùdig- envez, krouidigezh trevadennoù diabarzh, diazevidigezh un Ikaria vihan, embannadur endaozkek ar Jeruzalem Nevez, - hag evit sevel seurt kestell el

Loar, e rankont engervel kalon ha yalc'h an den- garcourion vourc'hiz. A-nebeudoù e kouezhont e rummad ar sokialourion gilstourmerion pe virourion taolennet a-us, ha n'int disheñvel diute nemet dre e fedantegezh reizhiadekoc'h, hag ur feiz dall en efedusted vurzhus e skiant kevredigezhel.

Enebiñ start a reont ouzh pep ober politikel eus ar renkad vicherour, - nep ober eus ar seurt e tont bep taol, d'o meno, eus un dicuer a feiz dall en aviel nevez.

An owenourion e Saoz hag ar fourierourion e Frañs ze enebet an eil re ouzh ar chartourion, ar re all ouzh ar gempennourion.

4 Savlec'h ar Gomunourion e-keñver strolladoù dis-
seurt an eneberezh

Ar Rann II he deus lakaet a-wel savlec'h ar gomunourion e-keñver ar strolladoù micherour a zo evel ar Chartourion e Saoz hag Adaozeurion ar Glad e Norz Amerika.

Ar gomunourion a stourm evit lazioù hag amkanioù tostañ ar renkad vicherour; hegen el luskad a-vremañ e tifennont hag e terc'houezont war un dro dazont an emsav micherour. E Frañs ez entuont gant ar Strollad demokrat-sokialour enep ar vourc'hizelezh vicherour ha radikal, hep dilezel avat ar gwir da arzaelañ ar frazennadurezh hag ar sorc'h-ennoù chomet a-ziwar-lerc'h an dispac'h.

En Helvetia e harpont ar radikaled, hep diwelout e c'hoarvez ar strollad-se a elfennoù dis-lavarus, demokrated sokialour a c'hiz c'hall evit an hanter, radikaled vourc'hizel evit an hanterall.

E Polonia e skoront ar gostezenn a ra eus adaoz dispac'hel ar glad amplegad an dieubidigezh vroadel, eleze ar strollad a reas darsav Krakov e 1846.

En Alamagn e stourm ar Strollad Komunour a-du gant ar vourc'hizion, bewech ma ren ar vourc'hizion ur stourm dispac'hel ouzh an unpenniezh diharz-veli, ar vrientinelezh c'hladel hag ar vourc'hizelezh vihan. Ne pred avat ne baouezont a zihuniñ er vicherourion un emskiant sklaer ha fraezh ouzh ar gourzhenebadur feuls a zo etre bourc'hizelezh ha proleteriezh, evit ma oueze ar vicherourion alaman pa vo deuet poent, treiñ an azioù politikel ha kevredigezhel krouet gant ar renad bourc'hizel, e kemend-all a armoù enep d'ar vourc'hizelezh; evit ma c'hall, kerkent ha distrujet renkadoù kil-

stourmer Alamagn, deraouiñ ar stourm ouzh ar vourc'hizelezh hec'h-unan.

Gant Alamagn dreist-holl e pled ar gomunourion, peogwir emañ Alamagn e derc'hent un dispac'h bourc'hizel, ha peogwir e reno an dispac'h-se en azioù aracketañ ar sevenadurezh europat ha gant ur broleteriezh kalz diorreetoc'h eget hini Saoz er 17^t kantved ha hini Frañs en 18^t, ha peogwir ne c'hell an dispac'h bourc'hizel alaman nemet bezañ kentc'hoari un dispac'h proleterel.

E berr, e pep bro e re ar gomunourion o skoazell da gement luskad dispac'hel enep d'an urzh kevredigezhel ha politikel o ren.

E pep luskad, e recent eus ar berc'hentiezh, e pe zerez bennak ma ve degouezhet emdroadur ar gudenn-se, kudenn diazez an emsav micherour.

Erfin, e labour ar gomunourion da zegas emglev hag unvaniezh etre strolladoù demokratel an holl vroioù.

Ar gomunourion n'en em izelaont ket betek skeachañ o c'hredennoù hag o mennadoù. Embann a reont a-ouez d'an holl ne vo tizhet o fal nemet dre ziskar en he fezh an urzh kevredigezhel tremenet. Krenent ar renkadoù-ren rak an dispac'h komunour! Ar broleterion n'o deus nemet o chadennoù da goll. Ur bed o deus da c'houit.

Proleterion an holl
vroioù, en em unanit!

NOTENNOU

(1) Bourc'hizelezh a dalvez kement ha renkad ar gevalaourion arnevez, perc'henned an araeziou-kenderc'hañ ha korvoerien al labour gepret; proleteriezh, renkad al labourerion arnevez, hep araeziou-kenderc'hañ, rediet da werzhaño nerzh-labour evit bevañ. (Notenn Engels evit embannadur saoznek 1888).

(2) Pe resisoc'h, an istor skrivet. E 1847 ne oa ket anavezet mat ragistor ar gevredigezh, frammadur ar gevredigezh a-raok an istor skrivet. Abaoe, en deus HAXTHAUSEN dizoloet kenderc'henniezh an douar e Rusia. MAURER en deus prouet e oa anezhi ar bennaenn gevredadel a voe en orin istor an holl veuriadoù teuton, ha diskuezet eo bet tamm-ha-tamm e oa bet ar gumuniezh plouezel kengladel ar furm gentidik eus pep kevredigezh, adalek India betek Iwerzhon. Frammadur ar gentkevredigezh komuncour-se zo bet anataet en e stumm dibar gant dizoloadenn veur MORGAN war gwir natur ar "gens" hag e lec'h er meuriad. Gant steuziadur ar c'hentkumuniezhoù - se e teraoù rannadur ar gevredigezh e renkadoù diforc'h, hag enebet en dibenn. An argerzh-steuziañ-se a'm eus klasket heuliañ e - barzh "Orin ar familh, ar berc'hentiezh prevez hag ar Stad". Eil embannadur, Stuttgart 1886. (Notenn Engels. Embannadur saoznek 1888).

(3) E Frañs e veze graet "kumunioù" eusarc'hêrioù, ac'hoel a-raok ma tivizjont diframmañ digant aotrounez an dalc'h o emrenerezh dinazel


hag o gwirioù politikel, evel an Trede Stad. Dre vras, hon eus meneget Saoz evel pennskouer eus diorreadur armerzhel ar vourc'hizelezh, ha Frañs evel pennskouer he diorreadur politikel. (Notenn Engels. Embannadur 1888).

(4) Embannadur saoznek 1888: "evel en Italia hag en Alamagn".

(5) Embannadur saoznek 1888: "evel e Frañs".

(6) Anv ze amañ, n'eo ket eus an Assavidigezh saoz (1660-1689), hogen eus an Assavidigezh c'hall (1814-1830). (Notenn gant Engels).

(7) Gwir eo se dreist-holl en Alamagn, ma vez ar vonez hag ar Junkerion o c'hounit o-unan an darnvuiañ eus o madoù, euzh o merañ o-unan, hag o kenderc'hañ a-vras ar boetrabez hag an alkool avaloù-douar. Ar vrientinon saoz, pinvidikoch, n'int ket aet keid-all, nemet e ouzont ervat penaos kempouezañ diwerzhkadur o levecù dre reiñ o anv da gevredadoù dre gevrannoù douetus a-walc'h. (Notenn Engels evit embannadur saoznek 1888).



Koumanant 12 niverenn 45 F.
Koumanant d'ar Geriadur Istorel
hepken (4 niverenn) 15 F.
Koumanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn) 30 F.

Rener : G.ETIENNE
Embannerez : P.MAZE
Sekretouriezh : Preder, 30 Place des Lices 35 - Rennes

an arc'hant da : M. G.ETIENNE, CCP: 16 093 13, Paris

Pevare Trimiziad 1970
Priz ar c'haier-mañ : 5 F.

Moulet gant SADED
OPPF N° 35.709
Diskleriet hervez lezenn, Pevare Trimiziad 1970.



